



BUGALE JACOB

E pevar Arvest hag eun Taolen

Gant an Ao. G. HÉLIÈS, Beleg



BREST

4 — MOULLEREZ RU AR C'HASTELL — 4

1910

VA 7

10721

101.
132
1162

BUGALE JACOB

E pevar Arvest hag eun Taolen

Gant an Ao. G. HÉLIÈS, Beleg




BREST

4 — MOULLEREZ RU AR C'HASTELL — 4

1910





Savit en ho sav, breudeur muia karet... me eo Joseph,
ho preur (p. 70)

PERSONAJOU :

Jacob, patriarch santel.

Phanuel, servicher koz o ti Jacob.

Ruben,

Simeon,

Juda,

Nephtali,

Issakar,

Zabulon,

Levi,

Gad,

Dan,

Aser,

Joseph,

Benjamin,

Balthazar,

Phares,

Misraïm,

Eliab,

Eur marc'hadour euz bro Gallaad...

bugale Jacob.

mevellien braz e palez Theb.

gwardou e palez Joseph e Theb.

*En arvest kenta eur paotr iaouank c'huezek vloas
a rank ober Joseph... En daou arvest diveza, eun
den a dregont vloas.*

BUGALE JACOB

E pevar Arvest hag eun Daolen

KENTA ARVEST

Bugale Jacob e meziou Dothaïn

KENTA DIVIZ

*A gleiz Issakar a zo o kignat eur vaz alek... pelloc'h
e veler Dan hag Aser o korda eur fouet brouen ;
a zeou, Ruben ha Juda harpet ouz puns Dothaïn,
Nephtali ha Simeon en ho zav, Levi a zo azezet
var eur mean. (Ar pemp-ma a achu ho aslein).*

RUBEN

*Silaou ta, Nephtali ; pa zeo gwir eo achuet da
aslein ganez, kea da ober eur bale var an dachen,
m'ar plij, evit gwelet penaoz ema ho doare gant an
daou-zont... M'ho deuz ezom skoazel, n'ho deuz
nemet hen lavaret.*

NEPHTALI

*Ia, mont a ran raktal, Ruben, ha da c'hortoz va
distro, ra vezo Doue ganeoc'h oll... (mont a ra kuit).*

DAN HAG ASER

Ha ganez-te ive, breur Nephtali.

ISSAKAR

*Assa, breudeur, ne ket an dra-ze eo... Setu teir
sizun tremenet abaoue m'emaomp o reded bro gant
hon loened, deac'h e Sichem, hirio ama e Dothaïn,
ha n'euz menek ebet c'hoaz da zistrei da Hebron?...
Kaer zo lavaret, er gear e ve ebatoc'h hon doare o
tribi boued tom, eget o chokat ama bemdez bara
skarnilet hag ognon anter ridet.*

SIMEON

A gav d'id, Issakar ? Pep hini he aviz : Evidon-

me avad a zo gwelloc'h ganen tremen eur miz pen-da-ben er mod-ma eget chom daou zervez dusdu e bali Hebron, goude kaout eun tam boued a zoare... Ar gear ! na c'hellan mui her gouzaonv !

RUBEN

Da entent a ran, Simeon, da entent a ran... Hag evel-dot ec'h anzavan n'eo ket eun dra eas kaout lagad hon Tad o para varnomp dalc'hmad evel p'hen deffe c'hoant rei d'eomp da entent ema var zisfizians ac'hanomp.

SIMEON

Ma ne ve c'hoas nemet he lagad, na ve nemeur a dra, hag he deod-ta ! Emichans n'ho peuz ket ankounac'heat dija ar gourdrouzou hag ar rebechou kalet a rea d'eomp, eun neubeut derveziou araok ma kuiteamp Hebron ?

JUDA

O Simeon, va lez d'hen lavaret d'id : sulvui e teuan da sonjal en doare ma zeo bet great d'eomp ar rebechou-ze a gomzes anezo, sulvui e komprenan ne zoa e kaloun hon tad nemed eur reket ebken.

SIMEON

Pehini ta neuze, a sonj d'id ?

JUDA

Pehini ? n'eo ket diez hen divinout : an hini da ober vad d'eomp ! Ar c'hoant d'hon renta tud iaouank euz ar re fura e kreiz ar boazamanchou direiz a veler brema siouas oc'h en em skigna var douar Kanaan, evel er broiou dizoue.

RUBEN

N'am euz ket a boan o kredi kementze, rag, hon Tad dre ma zeo eun den a feiz hag a zoujans Doue a garfe, evel just, e zafe he vugale dre ar memez

hent ganta... Var ar poent-ze, ne gavan abeg ebet enna, pell dious eno... mez ar pezh ne da ket d'in, eo abalamour he rebechou a vez great peurvuia goude ma vez bet fourret pennadou enna.

(Aser ha Dan a zo oc'h essa ho fouet).

SIMEON

Ia zur, ha pa sonjan gant piou !... Gant hor breur Joseph, a vez d'alc'hmad var he dro, o kounta dezankement tra a reomp pe alavaromp... Joseph ! setu an hini a zo a re var va hent, hag a ra d'in beza diegus o tostât euz ar gear.

LEVI

Ouspen ugent gwech, ma ve kountet piz, am euz her c'hilevet gant he flatrerez.

ISSAKAR

Eun eston eo e gwirionez n'hen deffe kon Tad kaset aneza da bourmen divar he dro, abalamour d'ar vicher-ze.

SIMEON

A ia ! gortoz ta !... Joseph, hen gouzout a rez koulz ha me, eo kolladen an ti... Ni, pa zao c'hoant ganeomp lavaret an distera tra, a vez great d'eomp kloza hor muzellou, brao ha kempen, eleac'h ar moumoun-ze a vez lezet da rimadella a bep seurt belbiachou, beteg zoken he ureou diskiant.

(Aser gant ar fouet var he skoas ha Dan a deu da gichen ar re all).

RUBEN

Evelato eo bet dizounet, n'euz ket c'hoas pell, divar ben an ureou-ze. Eun dervez m'edon adrén an del, her c'hlevis o kounta d'hon tad unan euz an daou ure hen doa rimadellet d'eomp-ni dija : « Tad, emeza, seblantout a rea d'in edon oc'h endram gwiniz gant va oll vreudeur : va herdin-me

a jome en ho zav, eleac'h herdin va breudeu ar stoue d'an douar evit adori va re-me. » — Ne peuz ket achu gant an ureou-ze ? Eme hon tad raktal gant eur vouez rust... Eleac'h kozeal a draou evelse dirag da vreudeur, silaou ar pez a lavarint d'id, bez mad evito, aketus da ober ho lavariou..

JUDA

Ac'hanta ! ar pez a ioa emichans eur c'huzul euz ar re vella. Gwelet a rit ervad n'oamp ket kaseat gant hon tad, evel ma krede lod' ac'hanoc'h. (*Nephtali a zistro*).

EIL DIVIZ

NEPHTALI

Breudeur, setu ama penaoz ema an traou gant ar re-hont... Da genta, Zabulon, ervez ma lavar, a zo dija skuiz gant he vanden niverus, hag a c'houlenn ma zafe unan ac'hanoc'h da gemeret he blas, ar c'henta ar gwella.

LEVI (*o sevel divar e vean*)

Me zo o vont raktal, pa z'eo gwir eo en em gavet va zro da evessât euz an denved... Nemet unan benag en ho toues a c'hoantafe kaout an enor-ze... Mez ne gredan ket... (*Mont a ra kuit*).

RUBEN

Hag hor breur Gad, n'euz netra a nevez ganta ?

NEPHTALI

Gad n'en em glem ket c'hoas gant re a skuisder ; evelato, e ve anaoudek en da genver-te, Ruben, ma peffe ar vadelez da vont eb dale en he leac'h, rag lavaret a ra eo d'ide bale brema da genta.

RUBEN

N'hen deuz ket skoet fall ; ha bremaik e zin d'hen dizamma ; mez da c'hortos e rafes d'eomp kals plijadur en eur gounta eun neubeut euz an traou e peuz gwelet.

NEPHTALI

Kounta petra, va Doue benniget ? Kompren a rit n'oun ket chomet da zellet ken piz-ze en dro d'in ; ne garan ket chom da c'hlapezat evelse.

ISSAKAR

Eur ger koulskoude divar ben hon loened : An denved, ha kenderc'hel a reont-hi da grignat an dachen zrus hon neuz kavet evito er mintin-ma ?

NEPHTALI

Al loden vrasa a zo dija gourvezet e disheol ar gwez palmez ; ar re all a gendalc'h da beuri, mez evel divar fae, ar pez a ziskuez sklear n'hon deuz ket leac'h da gaout truez euz ho c'hov.

ASER

Naphtali, hag ar gavriket bian ?

DAN

Hag hon denvedigou ?

NAPHTALI

A zo ken seder ha tra, pa ra d'eoc'h kaout plijadur o klevet euz ho c'helou. An denved bian dreist-oll, a ioa eun dudi sellet outo : avechou e lamment en ear, avechou all e reant pen an eil d'egile, evel p'ho dije c'hoant da essa ho nerz... Ar friantiz eo merk ar iec'het evito.

ASER

O na pegen chansus ompni er bloaz-ma gant hon loened !

RUBEN

Ia, hen lavaret mad a c'hellomp ; ha penaoz na ve ket a lorc'h en hon tad, pa deu an Aotrou Doue da skuilla e vennoziou var he dieges evel m'her gra ! Sûr oun, e zeus ouspen trivac'h miz abaoue ma n'hon deuz kollet pen aneval ebet.

JUDA

Ar c'hontrol a zo gwir, a drugare Doue, rag pa zistroimp ac'halen e vezo ouz hon heul ugent gavrik nevez, ha vandro c'huec'h dousen pen danvad bian.

SIMEON

Petra ra-ze ? Hag e sonjit e vo laouenoc'h bisaij hon tad, goude treissa d'ar gear kementze a beadra ? Evidon-me n'her c'hredan ket, tra.

RUBEN

Allo, Simeon, setu te adarre en da woassa... Awoalc'h brema euz ar gaoz-ze, da viana beteg gwelet dirag hon daoulagad an digemer a vo great d'eomp e bali Hebron.

TREDE DIVIZ

ZABULON (*o tont*)

Eur c'helou ! eur c'helou, bredeur !... Arru e zeus eun den d'hor c'haout e kreiz hor meziou.

AN OLL

Piou ta ? Piou ta ?

ZABULON

Evit her gouzout, n'ho peuz nemet trei ho taoulagad varzu krec'hen Dothain... (*an oll a zell*) Achanta ! n'hen anavezit ket, dre ar zae marellet a zo ganta ?

DAN

Joseph eo ; eur glaoustre a rafen.

NEPHTALI

O ia ! eb douetans ebet, ar moumoun-ze eo ; an ureer divalo hen deuz an ear da lavaret d'eomp e rankimp plega d'he lezen ha stoui hor pen dirazan, m'ar plij, beteg an douar.

ISSAKAR

Mad ! n'ouzoun ket penaoz hen deuz gellet en em zispartia evelse euz he dad !

NEPHTALI

O kredi a c'helles e z'eus eun dra benag oc'h her poulza : piou hen goar ? Marteze eo arru en aviz rimadella d'eomp eun ure nevez benag, ken diskiant hag ar re genta.

ZABULON

Kredi a rafen kentoc'h e teu d'hor spia evit kaout tro d'hor flatra adarre d'hon tad.

SIMEON (*gant kounnar*)

Lezit aneza ta da zont... Eb dale marvad e velo pe seurt vad a deuio dezan euz he oll ureou. Ar gwel ebken aneza a laka va goad da virvi, hag hen diskleria a rankan ama a vouez huel, setu deuet ar mare da viret ouz hennez da noazout d'eomp hiviziken.

RUBEN

Mez petra a fell d'id lavaret, Simeon ? Aon am euz da veza entetet fall, rag-se hast buan dizelei d'eomp ar pezh a zo en da speret.

JUDA

Awoalc'h a ve gourdrouz Joseph eur vech evit mad, ha difen outan tintal ger ebet mui divar hor

pen, dindan boan da veza kalafeted... Ne gav ket d'id, Simeon ?

SIMEON

C'hoariellerez tout !... Kredit ac'hanon : ne z'euz nemet eur remed evit divoaza hennez euz ar c'hiz hen deuz kemeret en hor c'henver : hen lakât d'ar maro !

RUBEN

D'ar maro, siouas ?

JUDA

D'ar maro ?

ISSAKAR

Te avad, Simeon, a zo iud evelato en he genver !

SIMEON

Ia, d'ar maro, lavaret mad a ran, hag hirio memez !... Da betra e talvesfe her gourdrouz pe rei dezan eur roustaden ? Traou veañ tout ! Eur vech distro da Hebron, kenta tra a rafe a ve hon diskuil, ha setu hon tad kounnaret en hon eneb goassoc'h eget morse... Setu perag, ma ve great diouzin-me, e ve lazet bremaik, ha goloet he gorf a zouar beo... Piou a ve gwest d'hon tamal ?

RUBEN

Hor c'houstians, Simeon, hor c'houstians !.. Ah ! en han' Doue, pella euz da speret eun evelep sonj fallakr !.. Joseph a zo breur d'eomp, arabat a ve hen ankounac'hât, hag aon am euz e teufe he c'hoad, eur vech skuillet, da grial venjans en hon eneb, evel ma reas gwechal hini Abel a eneb Caïn.

SIMEON

Lez aneza ta da grial venjans ; kaer hen devezo koulskoude ne viro ket ouzomp da gousket disoursi.

RUBEN (*d'ar re all*)

C'houi oll, va zikourit da ziarben Simeon euz

eun evelep torfed. Rei taol ar maro da eur breur ! biken na dleit assanti da eun dra ken skrijus... M'ar fell d'eoc'h en em zizober euz Joseph, eleac'h trempa ho piziet en he c'hoad, diskennit aneza kentoc'h er puns seac'h a zo ama... N'en em gavo goudeze nemet ar peza a blijo gant Providans Doue !

JUDA

O ia, gwelloc'h eo d'eomp ober evel ma lavar hor breur Ruben... Euz pe seurt aviz out-te, Issakar ?

ISSAKAR

Evidon-me ne glaskin ket hen nac'h : me a zo a du gant Ruben.

NEPHTALI

Ha me ive !

AN OLL

Me ive ! me ive !

SIMEON

Greompt ta evelse, p'emaoc'h oll a eneb d'in... Goude tout, pe mervel trum, pe mervel gant an dienez a zo ato mervel... Me a c'houlén evit va lod hen disken e diabars ar puns, gant ma vezin sikouret gant daou ac'hanoc'h... Eürusamant, am euz aze eur gorden grenv.

RUBEN

Deuet ar mare evidon d'ho kuitât, rag Gad a dle beza inouet duze oc'h va gedal... mez, araog pellât ac'haleu e fell d'in e klefec'h va ali diveza : grit kempen euz Joseph eb morse ankounac'hât eo ho preur evel ma zeo va hini...

(*Mont a ra kuit*).

SIMEON

N'oa ket re abred e vije eat divar hon tro eun evelep prezeger... Ni a voezo brema petra da ober

ZABULON (*o sellet*)

Ar moumoun a zo dija tost d'eomp... Eur bisac'h a zo ganta var he gein... Dont a ra a diz, gant eun ear laouenoc'h... eget an heol !

SIMEON

Eb dale, me bari, ne vo ket ken laouen-ze he fas... Allo, breudeur, greomp dezan an digemer a verit kaout ; kemerit eur fas trist oc'h her gwellet ; an nep a ziskuezo chalantis d'ar moumoun hen devezo affer ganen-me...

(*Gedal a reont Joseph*).

PEVARE DIVIZ

JOSEPH (*goude lakât ar bisac'h var an douar*).

Ra vezo Doue ganeoc'h oll, breudeur muia karet... Dont a ran abers hon tad da zigas d'eoc'h an tanva euz boued ar gear... O na me am boa mall da gaout euz ho kelou !

SIMEON

Lavar ta e poa mall da zont d'hor spia, fallakr ma z'out ! Hounnes oa da vicher vella...

(*Mont a ra da zastum he gorden*).

JOSEPH (*stravillet*)

Va breudeur, petra ho peuz hirig ?... Perak ar sellou du a rit ouzin ?... perak eo ken tenval ho pen ?... Livirit d'in buan, me ho ped,... oh livirit d'in...

SIMEON (*o tostât outa*)

Ne zalei ket d'hen gouzout, rag n'ema ket en hor sonj chom da varc'hata ganez.

(*Lakât a ra he zorn var he skoaz*).

JOSEPH

Simeon, ne ra drouk ebet d'in, en han' Doue... me da gar, Simeon.

SIMEON (*o tiviska sae Joseph*)

Ar zae marellet-ma a rankomp da gaout da genta : re a boan a rea d'hon daoulagad hen gwelet var da ziou skoas.

ZABULON

Kalz re a lorc'h a ioa ennoud abalamour da hounnes !

JOSEPH (*divisket*)

Ma n'euz nemet va zae oc'h ober poan d'eoc'h, kemerit anezhi... gant ma ne reot drouk ebet d'in... (*o velet ar gorden o vont endro dezan e koez d'an daoulin*). Pardoun... Simeon !.. pardoun... lez va buez ganen.

SIMEON (*en eur starda ar gorden*)

Piou a gomz d'id euz ar maro ?.. N'emaomp ket o vont da blanta ar gountel en da beultrin, ne raimp nemet da zisken e diabars ar puns a veles aze, hag a zervicho d'id da lojeis hiviziken...

JOSEPH

O va zad ! O va zad !

ZABULON

Moumoun divalo, ne ket gant da dad e-m'aout brema... Kaeroc'h zo ; na c'helli mui her gwelet dirag da zaoulagad.

JUDA

Taol evez, Simeon, da lakat re stard ar gorden !

SIMEON

Ar pezh a zo great a jomo great, Juda, ha ne dan ket da gommans va labour a nevez evit ober pli-

jadur d'id. — Allo ! daou zen a volonte v'ad ama buan, m'hen diskennin er puns.

(Zabulon ha Dan a ro skoazel da Simeon).

JOSEPH *(dre ma tisken er puns)*

Va Doue !... pardounit dezo... pardounit dezo.

ISSAKAR

Nag a ardou a zo ganta o vont d'he lojeis nevez ! Koulskoude zur, aze e vo eas dezan ureal evel ma plijo ganta, da c'hortos ma teuo an ankou d'her samma.

NEPHITALI

Ar pezh ne zaleo ket pell, rag penaos herzel, eb tam da zribi, eb tam ear ebet kouls lavaret, hag eb banne dour da eva, evita da veza en eur puns ?

ISSAKAR

Gwir awoalc'h ar pezh a leveres, Nephtali.

PEMPED DIVIZ

SIMEON

Ah ! setu great an taol, ha dija va c'haloun a zeblant beza digoroc'h, p'am euz gellet en em venji ! — Selaouit, breudeur ; m'ar kirit ec'h en em vodimp raktal en dro d'ar bisac'h evit tanva ar pezh zo enna !

ZABULON

Netra gwelloc'h ! Pep hini eta d'he blas araok kaout he lod !

(Simeon, Zabulon, ha Naphtali en em laka var eur c'hlin : Aser ha Dan a azez var an douar : Issakar ha Juda a jom en ho zav).

SIMEON *(o furchal er bisac'h)*

Sellit ! nag a draou lipous ! nag a voued drus ! — Da genta, eur guignen great dre viou ha bleud gwiniz, gant eun troc'had mël var he gorre... Zabulon, kemer da gountel ha gra lodennou.

ZABULON

Anad eo e tlie ar moumoun kaout an tanva, potret ; anez kementze marvad e vije bet tanaoc'h ar geusteuren... Juda, d'ide ar boulc'h kenta ; a galoun vad eo her c'hinnigan, te vear.

JUDA *(en eur gemeret)*

Bennoz Doue d'id, Zabulon.

SIMEON

En eur c'horn e velan ama diou fesken maout, rostet var ar glaou beo ; er c'horn all, frouez a bep seurt, fiezh, rejn du hag oranje... Astennit ho torn ma roin d'eoc'h bep a hini...

(Kement a reont bep a hini).

ZABULON

Ne gavan netra gwelloc'h da derri ar sec'het !... Ac'hanta, Juda, ne peuz ket lavaret d'eomp pe seurt blaz a gaves gant da dam skuignen ?

JUDA

Siouas ! gant va gwella bolontez, n'oun ket evit ober dezan disken... Eur beac'h pounner a zao var va stomok, pa sonjan e pe stuz e vo hon tad ben-niget, pa glevo ar c'helou a rankimp kas beteg enna !

ISSAKAR

Just avad ! me a zo ive oc'h en em c'houlenn penaoz e vo d'eomp ar gwella en em gemeret evit rei da entent d'hon tad e vo kollet he vab Joseph.

SIMEON

Lezit var va c'hount-me eun evelep kefridi... Arabat d'eoc'h kredi eo eb abek am euz diframmet he zae digant Joseph... (*en eur zevel ar zae en ear*) Ar zae-ma, pa vo trempet ganen e goad eur gavrik a gomzo anezi he-unan, eb n'hon deffe ezom da zisplega netra.

NAPHTALI

Koulskoude, Simeon, ne vo ket eas d'eomp chom dizeblant dirag daelou c'huero hon tad !

SIMEON

N'hen nac'han ket, an taol a vo pouner evita ; mez an amzer a zo eur remed da bep tra, hag ar glac'har-ze a deuzo a neubeudou, evel ma c'hoarvez gant pep glac'har all. — Goudeze peoc'h d'hor c'houstians !

ISSAKAR (*o sellet a gleiz*)

Nag a varc'hadourien o tremen dre aze gant ho c'hanvalet ! ' Nag a varc'hadourien ! Sellit ta, breudeur ! (*An oll a zav*). Ouspen diou zousen a zo anezo, sûr oun.

ZABULON

Ar re-ze a zo euz bro Galaad, hag a za d'an Ejipt evit gwerza ho marc'hadoures... N'eo ket ar vech kenta d'in ho gwelet oc'h ober ho hent dre meziou Dothain.

JUDA

Breudeur, eur sonj a zo em speret, mez n'ouzoun ket ha mad eo d'in hen dizelei d'eoc'h.

SIMEON

Allo, lavar d'eomp buan petra eo ar sonj-ze.

JUDA

Komprenit... En eur veled ar varc'hadourien-ze,

am euz sonjet e ve marteze gwelloc'h gwerza dezo Joseph eget hen dilezel aze en he buns, e pelec'h ne rato nemed disec'ha gant an dienez !

SIMEON

Gwerza dezo Joseph !.... Va Doue, perag n'her greomp ket raktal !.... Nephtali, kerz buan da gaout mestr ar vanden araok ma vo eat re bell, ha gra dezan dont ama ganez. (*Nephtali a ia kuit*). An neubeut mounis a resevimp a zervicho deomp evit meur a dra.

JUDA

Simeon, ne ket euz an arc'hant e tleomp sellet : kaera pezh zo, hor c'houstianz ne vezo ket ken bec'hiet pa zeo gwir, en eur verza Joseph, ne ziframmomp ket diganta he vuez, hag en doare-ze, e c'hello beva keit ha ni var an douar.

ISSAKAR

Hag eb na ve falloc'h he stad eget hon hini d'eompni, rag piou nemet Doue a anavez an amzer da zont ? Joseph a c'helfe beza eur pabor aneza e mesk an divroidi, kredit ac'hanon.

SIMEON

Ra vevo eürus ! ra vevo eürus ! a greiz va c'houloun hen reketan dezan ; mez, ma vez ebat he zoare e dianveas bro, hon hini ni ive a vezo ebatoc'h e bali Hebron, pa ne vo mui etre hon tad ha ni.

ZABULON

Evel ma lavare Issakar, an traou da zont a zo kuzet ouzomp... Mad, ne peuz nemet sonjal neuze, Simeon, pe seurt skotaden hon deffe, ma c'hoarvesfe gant ar moumoun gellout distrei da Ganaan, aben eun neubeut bloaveziou ac'han.

SIMEON

O na te zo dientet evelato, Zabulon : Eun evelep

tra na c'hell ket c'hoarvezoud. En em laka e leac'h Joseph, ha goulenn ouzid da unan penaoz e c'helfes dont euz an Ejipt beteg ama, eb koeza pe etre daouarn laeroun, pe etre skilfou anevaled gouez.

ZABULON

Evit gwir n'am boa ket evesseat euz kementze : Brema avad e velan n'hon deuz ket a leac'h da gaout enkreuz e giz ebet.

SIMEON

Nephtali a dle beza var ar poent da zistrei gant ar marc'hadour : da c'hortos ma vint ama, e ve mad d'eomp tenna Joseph euz ar puns... Dan, Zabulon, roit d'in an dorn adarre...

(Tenna a reont Joseph).

C'HUEC'HVED DIVIZ

SIMEON *(da Joseph)*

Setu chenchet aviz ganeomp en da genver ! Eleac'h da lezel aze, e diabars ar puns-ze, hon deus kavet gwelloc'h da verza da eur marc'hadour a zianveas bro.

JOSEPH

Ho klevet am euz gant ho kaoz... Raktal am euz pedet Doue da zont d'am c'hennerza ; setu perag am c'havit brema ken soublet d'he volonteiz santel... Grit, va breudeur, ervez ma plijo ganeoc'h, mez n'euz fors e pe gorn euz ar bed e vezin harluet, me na eanin morse d'ho karet.

(Plega a ra he ben da voela).

SIMEON

Araok hirio oa d'id neuze diskuez da garantez evidomp...

AR MARC'HADOUR *(o tostât)*

Ervez lavar su den-ma a zo deuet d'am c'her-c'het ho peuz eun tam affer da ober ganen ?

SIMEON

Ia zur : Ar sklavour iaouank a zo etre va daouarn n'eo ket falvezet ganta plega d'hon lezennou, hag e zomp en em glevet d'hen gwerza... Va den mad, gwelit pegement e tal d'eoc'h.

AR MARC'HADOUR

Petra benag ma z'eo c'hoas iaouank, ha dic'halloud var al labourou tenn, e kinnigan ugent diner evita.

SIMEON

Ugent diner ebken !

AR MARC'HADOUR

Eb eul liard all ouspenn... Roit buan ho ker, ia pe nan, rag n'am euz ket amzer da zale.

SIMEON

Akord ! va den mad ! great ar marc'had ! — Hiviziken eta ar sklavour-ma a zo ho peadra : Grit anezan ar pez a blijio ganeoc'h.

AR MARC'HADOUR

Setu ama oc'h arc'hant... *(en eur gounta var dorn Simeon)* Pemp..., dek..., pemzek... hag ugent. *(En eur gemeret Joseph).* Ha brema, deus d'am heul-me, paotr iaouank, beteg bro an Ejipt, e peleac'h e vo desket d'id plega...

JOSEPH *(araok mont kuit)*

Kenavo ar bed all... Kenavo...

(Epad m'ema Simeon o kounta he arc'hant, he ben pleget, ar re all a zo sebezet).

JUDA

O Joseph !... O paour keas breur !... He gomzou diveza o deuz treuzet va c'haloun hed a hed, ha biken ne c'hellin ho ankounac'hât.

ISSAKAR

Ha ma pije taolet evez eveldon-me, Juda, euz ar zel truezus hen deuz great varzu ennomp, araok hor c'huitât... Biken ken neubeut na vin gwest d'hen ankounac'hât... (*Mont a ra da zellet*) Bep an amzer, hen deus evel c'hoant da ober c'hoas eur zel varzu ama, mez ar marc'hadour a ra raktal eur jachaden grenn var he vreach evit ober dezan bale.

NEPHTALI (*o vont da zellet*)

Setu hi en em gavet ho daou tost d'ar varc'hadourien all... Na veles ket, Issakar ? E meur brema o sikour Joseph da bignat var gein eur c'hanval...

JUDA (*o vont ive*)

Red eo d'in ive gwelet evit ar vech diveza va breur Joseph, rag ne ket lavaret her gwelfen mui... Ah ! setu hen ahont. Ar gwel ebken aneza a ra vad d'am c'haloun...

ISSAKAR

Ar pezh a zo sur, n'her gweli ket epad pel amzer... Setu ar c'hanvalet o tiskenn d'ar c'hostez all d'ar grec'hen... Na veler mui nemet he ben... Achu tout...

(*Epad ma chomont da vantri, Ruben a deu dre gostez ar puns, hag a c'halv Joseph*).

SEISVED DIVIZ

RUBEN (*o sellet er puns*)

Joseph... Joseph... (*d'he vreudeur*). Mez e peleac'h ema Joseph eta, pa n'her c'havan ket ama ?

ZABULON

Re zivezad, Ruben, e teues d'her c'hlsk.

RUBEN

E peleac'h ema hor breur ? E peleac'h ema ? Respontit buan.

SIMEON

Gwerzet eo ganeomp evit ugent diner.

RUBEN

Gwerzet ?

SIMEON

Ia, da varc'hadourien euz bro Galaad a zo o paouez tremen dre aze evit mont d'an Ejipt.

RUBEN

Petra ? Eb dont d'hen digemen d'in, ho peuz kredet gwerza ho preur ? O tud digaloun ma z'oc'h ! (*Juda a zirol*). Goude eun evelep torfet, am euz aon e ve milliget evidomp ar meziou-ma... Ne fell ket d'in e chomfemp ama pelloc'h.

SIMEON

Petra raimp ni ta neuze ?

RUBEN

En em lakit raktal, pep hini e pen he vanden jatal, ha buan en hent evit m'en em gavimp e bali Hebron, abars varc'hoas da bardaez... Ar goassa zo siouas ! eo pa rankimp dizelei d'hon tad ar c'helou her c'haso marteze beteg ar bez :

O va Doue, na lezit ket ho preac'h da goeza var-nomp gant re a gounnar, abalamour da eun torfet evel ema.

EIL ARVEST

Bugale Jacob e bali Hebron

KENTA DIVIZ

JACOB (*he unan azezet e kichen he delt*)

Beteg pegeit eta e rankin-me chom eb kelou ebet?... Setu ar pardaez o tostât... ha Joseph ne zistro ket. — Derc'hent deac'h pa her c'hasen varzu Sicheu, evit anaout doare he vreudeur,... e roas d'in he c'her e vije distro hirio, kerkent hag ar c'hreiz-deiz... Aon a zao ganen dija e ve c'hoarvezet eun darvoud... rag, goude ma ve bet red dezan mont larkoc'h... beteg Dothaïm... e peleac'h e vez avechou va bugale... hen dije bet amzer awoalc'h... d'en em gaout aben ar poent-ma. — Ah! perag am euz-me her c'haset duze? Penaoz n'eo ket deuet em spered hen lezel er gear gant he vreur bian Benjamin?... Gwelloc'h a vije bet d'in mont va unan... En despet d'am oad, harpet var eur vaz... am bije great an hent buanik awoalc'h... Evelse am bije gwelet dreizon va unan doare va anevaled,... ha roet d'am bugale... eun testeni beo euz va c'harantez en ho c'henver... (*Sevel a ra da zellet*). Kaer am euz sellet varzu Sicheu... den ebet atao o tistrei... den ebet o tisken dre guinodennou Hebron. (*A vouez huel*). O va Doue! va Doue! grit eur zel a drugarez euz eun tad, a zo bâr he galoun a enkreuz. (*En eur zistrei e vel Phanuel*). Te eo a zo aze, Phanuel? Ra vezo Doue ganez, va servicher mad ha leal.

EIL DIVIZ

PHANUEL (*en eur saludi*)

Ha ganeoc'hive, mestr bepret karet... Ervez m'ho

poa gourc'hemennet, ar goazi a zo laosket da beuri var al letounen, ha Benjaminik am euz karget brema d'ho divoal... Mez, petra ho laka da huanadi ha da hirvoudi, evel ma reac'h aze bremaik, p'edon oc'h en em gaout?

JACOB

Eur bar enkreuz spountus... a zo deuet da vec'hia va speret ha va c'haloun... eb na ven gwest, evit c'hoas, da gompren petra ro abek da gementze.

PHANUEL

Ha divar ben petra, mestr?... Beteg vrema, her gouzout a rit, c'houi n'ho peuz kuzet netra ouz ho servicher Phanuel, ha ne ket hirio emichans e zafec'h da glask nac'h ouzin ar pezh a ra ho poan speret

JACOB

Joseph... va mab Joseph ne zistro ket.

PHANUEL

Na gemerit ket kementze a nec'hamant, me ho ped, var zigarez ma n'eo ket en em gavet hennez aben ar poent merket... Gouzout a rit kouls ha me petra eo ar vugale... Pa vezont en hent, e chomont da vantri... pe da c'hoariellat gant kement tra a velont hag an amzer a dremen ebioù dezo, na voezont dare peur... Joseph na c'hell ket mui dale pell.

JACOB

Ah! n'emaout ket ganthi, Phanuel paour,... n'emaout ket ganti... Me am euz leac'h da gredi e zeus c'hoarvezet ganta eun drouk benag.

PHANUEL

Pe seurt drouk?... Drouk ebet: he eal mad n'hen dije ket hen dilezet emichans!

JACOB

Silaou ma kountin d'id... En noz tremenet, me

am euz bet eun ure... ure poanius... ure ankenius m'ar deuz bet biskoas unan... Seblantout a rea d'in edot o tiframma diganen Joseph... va mab muia karet Joseph... N'oun ket gwest avad da rei da anaout... na gant piou... nag e peleac'h... na penaoz. Ar pezh zo sur, kaout a rea d'in oa tennet diganen evit ato, ha kementze a voustras var va feultrin beteg ober d'in divuna var an taol e kreiz eur mor a zaelou.

PHANUEL

O mestr! va lezit d'ho kentelia eun neubeut ben-nag; an ureou ne d'int netra, traou vean tout, a dremen dre speret an den, ken aliez a bep noz, ha ne veritont ket e ve taolet evez outo.

JACOB

A gav d'id, Phanuel?... Silaou ac'hanon c'hoaz... Doue a c'hell dre skeudou pe ureou, dizelei d'he vugale an traou da zont... Her great hen deuz e kenver va zad Isaac... koulz hag e kenver va zad koz Abraham... Ha perag her c'huzat ouzid? Doue hen deuz dija komzet ouzin en doare-ze. Eun der-vez m'edon en em roet da gousket var hent Haran, e velis eur skeul, eur pen anezi harpet en douar, hag ar pen all en Env... hag euz gorre ar skeul-ze, Doue a lavaras d'in kement-ma : « Jacob, emeza, an « douar m'emaout varna gourvezet, me hen roïo d'id « ha d'ar re a ziskennou euz da lignes... » — Mad, Phanuel, al leac'h ma c'hoarvezas ar burzud-ze eo Bethel ; hogen d'an ampoent, douarou Bethel n'oant ket c'hoas d'in... mez prest da c'houde avad, e teuchont da veza eul loden euz va leve... Brema e veles da unan n'int ket traou vean tout an ureou a deu d'an den.

PHANUEL

Bah ! eur vech pe ziu n'eo ket atao, ha var zigarez m'edo Doue eno o komz ouzoc'h e kreiz ho kousk

ne ket lavaret e teufe euz he berz an ure ho peuz bet en noz tremenet.

JACOB

Salo e ve ar wirionez dious da gostez ; ne c'houlennan ket gwelloc'h... mez n'ema ket, Phanuel... Sell, eun dra benag a zo ama, em c'hreiz, hag a lavar d'in ar c'hontrol beo... (*mont a ra adarre da zellet*) Den ebet atao !... Kaer am euz dispourbella va daoulagad da zellet... O va mab ker Joseph..., ma ne zistroes ket, bali Hebron ne vo mui eun dudi evidon, en despet d'he oll gwez kaer, d'he glasvezennou, ha d'he bokedou a bep seurt liou... (*o tistei ouz Phanuel*) Iskuz ac'hanon, Phanuel paour... ne ran ket mad marteze, oc'h huanadi evel m'her gran... Goude tout, neketa, n'en em gavo nemet ar pezh a blij gant an Aotrou Doue.

PHANUEL

Nan adrazur, hag evel ma voezoc'h koulz ha me, Doue a zo eun tad ken madelezus ma reiz ato pep tra evit mad he vugale.

JACOB

... Mont a ran da ober eun tamik diskuiza, aze dindan va zelt (*en eur vont kuit*) Kerkent ha ma pezo eur c'helou benag, dired raktal d'hen rei d'in da anaout, rag mall bras am euz da veza sklerijennet.

PHANUEL

Kounta varnon a c'hellit, mestr, ha red eo esperout n'am bezo da gas d'eoc'h nemet eur c'helou a levenez.

TREDE DIVIZ

PHANUEL (*he unan*)

Feiz hon Tad Noe ! Biskoas da viana n'am euz

gwelet va mestr Israel er stuz m'ema enna hirio, dre m'an deuz fourret en he ben eo kollet Joseph, ha lakeat d'ar m'aro marteze... Gwir eo, ma c'hoarvez dezan koll hennez, hen devezo great eur c'holl euz ar re voassa tout, rag, goude ma ve great kant guech tro Kanaan abez, na ve ket kavet eur c'hrouadur par da hema...

Eb ober gaou ebet euz Ruben ha Juda a zo pao-tred iaouank a fesoun, euz ar re fura zoken, e c'hellan lavaret koulskoude eo Joseph ar gwella etouez mibien an ti-ma, speredek dreist an oll, dous evel eun oanik, laouen evel an eol d'an nevez amzer, devot ha pur evel eun eal..., en eur ger, poltret beo he vam Rachel...

Abalamour da-ze, Jacob va mestr hen deuz atao her c'haret dreist ar re all... Va Doue, c'hoant am beffe zoken da lavaret e tiskueze re freas ar garan-terez hen devoa evita, ar pezh a roe tro d'ar vugale all da veza eun tamik jalouz, a sonj d'in. — A ia : pebez tenzor oa Joseph evit an ti-ma ; setu perag, m'ar d'eo kollet e gwirionez me en em c'houlenn, me, penaoz e vo gwest Jacob da herzel ouz he ran galoun... O na me am euz mall ive da veza sklerijen-net eun neubent benag ! (*Klevet a vez trouz fouetou hag oroullerou*). Hein ? petra glevan-me ? Daoust hag ar vugale a ve dija o tistrei d'ar gear gant ho loened ? Possubl awoalc'h ! Greomp buan eur zel varzu ar meziou (*mont a ra da zellet*). Just avad ? int-hi eo... Setu al loened oc'h en em zastum dija a vandennou, peb hini dirag he lochen... Ar macut griz adarre er pen araok !... Ah ! ne zalein ket da veza kelennet, rag setu Ruben, Issakar ha Nephtali oc'h en em glevet evit diredet ama araog ar re all... E maint arru d'am c'haout...

(*Abars m'en em ziskuezoent Phanuel a gomz*)

PEVARE DIVIZ

PHANUEL

C'houi eo, va mignoured ? Digoezet dija ?

RUBEN

(*o tont gant he zaou vreur Issakar ha Nephtali*).

Ia, Phanuel, setu ni adarre en Hebron, a drugare Doue, goude teir sizun tremenet ganeomp duze e kreiz ar meziou gouez, dindan bolz an Env.

ISSAKAR

Kaer zo lavaret, Phanuel, ar gear eo ar gear, ha n'euz leac'h all ebet c'houekoc'h da galoun an den var an douar.

PHANUEL

Da gredi a ran, va mignoun, eb poan ebet, setu perag ar vicher a vessaer ho peuz oll kemeret n'he deuz biskoaz great avi d'in... Gwelloc'h oa ganen chem da labourat ar vinien... Mez ne ket an dra-ze eo : Penaoz eo bet ho iec'hed duze ? Ne zeus cho-met nikunac'hanoc'h da c'hourlerc'hat en hent ? Brao ho peuz great ho peach ?

RUBEN

N'hon deuz ket bet da glem re an oll, Phanuel.

NEPHTALI

Dek edomp o kuitat Hebron, brema e zeus teir sizun, hag omp dek adarre o tostât ouz hor lojeis...

PHANUEL

Petra livirit aze ? petra livirit ? N'oc'h nemet dek ebken ! Joseph ho preur n'ema ket eta o terc'hel kompagnunez d'eo'h ?

NEPHTALI

Nan zur !

PHANUEL

O pebez maleur ! pebez taol pouner ! Komprenit : Ho tad karantezus, gant ar vall hen devoa da gaout euz ho kelou, hen deuz kasset Joseph en hent, derc'hent deac'h vintin, kerkent ha goulou deiz, en eur c'hourc'hemen dezan mont beteg Sichein, en aviz ho kaout eno gant ho chatal.

RUBEN

N'edomp ket e Sichein, mez e meziou Dothaïn, ac'hano e teuomp brema var eün tenn.

PHANUEL

Entent a ran abalamour da betra Joseph n'hen deuz ket ho kavet, mez ne velan ket c'hoas perag n'eo ket distro euz Sichein aben ar poent-ma. Ho tad ive a zo enkrezet oll he speret abalamour da gement-ze.

RUBEN

Hen diskleriet hen deuz dirazoc'h, Phaniel ?

PHANUEL

Ia, Ruben, n'euz ket c'hoas pell amzer abaoe m'hen deuz digoret frank he galoun. Ar pezh a ra he vrassa enkreze eo an ure trubuilus hen deuz bet en noz tremenet... Epad e gousk e seblantas dezan gwelet he vab tennet diganta, diframmet euz a dre he zaouarn, kasset da bell bro, eb na vije gwest d'hen divoal e fesoun ebet a eneb he adversourien...

ISSAKAR (*da Ruben*)

Pa sonjes-te var gement-ze, Ruben ? Daoust ha Doue hen deffe digasset d'hon tad eun evelep ure ?

RUBEN

Possubl awoalc'h, Issakar ! possubl awoalc'h — (*da Phaniel*) Phaniel, selaoit ar ger a zo var va muzellou abaoe m'omp en em gavet dirazoc'h :

P'edomp o tont d'ar gear assemblez, hon daoulagad a zo koezet var eur zae marellet, a ioa astennet var bordik an hent, hag hon deuz sonjet raktal oa sae hor breur Joseph.

PHANUEL

Eur zae marellet, dilezet var an hent !! O diskouezit anezi buan ; rag m'ar d'eo e gwirionez hini ho preur, n'am bezo ket a boan evit hen anaout, goude beza her gwelet ganta ken aliez.

RUBEN

Siouas, Phaniel, n'ema ket gant nikun ac'hanomp hon tri... Simeon hen deuz kemeret ar garg d'hen lakât dirag daoulagad hon tad. Ne zaleo ket da zont ama, bezit sur (*o trei da zellet*). Just avad : setu hen arru duhont gant Zabulon ha Juda.

PHANUEL (*o kroazia he zaouarn*)

Pebez trubuil ! Pebez abaden a ran galoun a dremeno ama bremaik, m'ar d'eo c'hoarvezed an darvoud ! Mez red eo esperout koulz koude n'eo ket c'hoarvezet...

PEMPED DIVIZ

JACOB (*araok en em ziskuez*)

Seblantout a ra d'in beza klevet mouez va bugale muia karet... (*Epad ma teu Jacob dre eur c'hostez e veler Simeon o tiboucha euz an tu all gant Juda ha Zabulon*). — Gwelet a ran brema ne fazient ket : setu eul loden ama dija, ha setu re all oc'h en em gaout dre aze... Assa, Phaniel, goude ar bromessa e poa great bremaik, n'out ket deuet d'am gervel, ha te o c'houzout ar vall am boa da gaout kelou euz va bugale ?

PHANUEL

Iskuzit, mestr ! Edon o vont d'ho kervel p'am euz ho klevet o tostât.

(*Ruben a dosta a neubeudou ouz Jacob*).

RUBEN

Salud d'eoc'h, tad meurbet karet (*pokat a ra d'he zorn*). En hano va oll vreudeur e reketan a greiz va c'haloun ma plijo gant Doue ho lezel c'hoaz pell amzer var an douar, leun a nerz hag a iec'het. (*An holl a bleg ho fen evit reseo bennoz ho zad*).

JACOB (*en eur zevel he zorn da venniga*)

Ra goezo bennoziou an Env, varn'out ha var da vreudeur, ken puil ha ma koez argliz var menezioù Jelboe : — Ac'hanta, pe seurt kelou a zigassit d'in hirio ? Iac'h oc'h bet bepret var douarou Sicheu ?

RUBEN

Tad, var letounennou Sicheu omp bet da genta, evit gwir, mez ne ket ac'hano e teuomp brema ; euz Dothaïn eo.

JACOB

Euz Dothaïn ? Emichans ho preur Joseph en deuz bet an heur vad d'ho kaout eno ?

RUBEN

Joseph ?... va zad !... Daoust hag hen digasset ho poa varzu ennomp ?...

JACOB (*da Phanuel*)

Petra lavaren-me d'id, Phanuel ? (*d'he vugale*) O va bugale, hastit affo va c'helen... petra eo deuet da veza ho preur Joseph ? Ha gwelet ho peuz-c'houi eun doare benag dezan ? Respountit buan.

SIMEON (*en eur zont var araok, mez en eur guzat ar zae a dre he gein*).

Tad, ra blijjo gant Doue na ve ket skoet gant ar

maro... Koulzkoude, hen diskleria a deomp dira-zoc'h, p'edomp o tistrei d'ar gear hon deuz kavet eur zae marellet, tachaded a c'hoad, hag anter roget var he skoaz.

JACOB

Va mab, e pelec'h ema ar zae-ze ? E pelec'h ?

SIMEON

Evel aon am euz oc'h hen dispaka dirag ho taoulagad.

JACOB

Diskuez anezi raktal, me hen gourc'hemenn d'id..., diskuez.

SIMEON (*o tiskuez*)

Setu hi ama ; grit eur zell diouti ha gwelit hag hini Joseph eo...

JACOB

O ia ! hen anaout a ran... (*pokat a ra dezi*) Ah ! eb douetans ebet. ., Joseph a zo maro... biken n'her gwelin mui...

PHANUEL (*o kregi e breac'h Jacob*)

Kouraj, mestr !... Re abred eo d'eoc'h c'hoas koll pep esperans.

JACOB

O ! eun aneval gouez... hen devezo saillet varna.

JUDA (*o kregi er vreac'h all*)

Ni ho ped, mirit na vec'h diskaret gant ho klac'har... Evel ma lavar d'eoc'h Phanuel, n'eo ket kollet evidoc'h pep esperans da velet Joseph o tistrei da Hebron.

JACOB

Eo, Juda, eo : Ah ! perag oun-me bet diskiant awalc'h d'her c'haz euz ar gear ! — Dre va faot eo ! — Bugale..., pourchassit d'in va dillad a gaon...,

pourchassit zoken va bez... rag ar maro ne zaleo ket pell evidon.

SIMEON

Allo, tad, na zizesperit ket evelse eur vech c'hoaz... Daoust ha n'ho peuz ket unek mab all var ho tro, evit soursial ouzoc'h en ho kozni ?

JACOB

Siouas !... n'am euz mui va mab Joseph. Phanuel, Juda, va zikourit d'en em dreina beteg va zelt... Eno, astennet var va gwele..., e vin gwelloc'h eged ama... (*En eur vont kuit*) O va Doue !... c'houi ho poa hen roet d'in..., hen tennet ho peuz... diganen... Ra vezo great... ho polontez.

C'HUEC'HVED DIVIZ

ISSAKAR

Pebez abaden ankenius eo houma, evelato ! Pebez abaden !... Gouzout a reomp re vad penaoz eo kom-manset..., mez gouzout ervad e pe zoare e c'h achuo a zo eun affer all.

NEPHTALI

Evidon-me a zo stravillet neat, ne dan ket d'hen nac'h ha m'am bije gwezet petra a dlie c'hoarvezout, em bije goulennet chom da graïoua ar jatal e plas unan euz ar re-hont.

SIMEON

Kredi a c'hellez, Nephtali, n'emaout ket da unan er stuz a leveres aze... Paour keas tad ! beuzet e kreiz eur mor a c'hlaç'har hag abalamour da biou ! (*En em lakât a ra dirag Simeon*) Ac'hanta, Simeon, petra lavar d'id brema mouez da goustians ? Easoc'h ec'h en em gavez marvad goude an taol kaer e peuz lakeat ober !

SIMEON

Euz a beleac'h e teuez-te da viana, Ruben ? An ear e peuz da deuler ar beac'h varnon-me abez, evel pa ne ve den all ebet en affer nemed-hon.

ZABULON

Red eo lakât an traou egis m'emaïnt... M'ar deuz torfet, hag e zeuz, oll hon deuz perz enna, te koulz hag ar re all.

RUBEN

Me ?

ZABULON

Ia, te da unan. Evel ma z'out ar c'hossa euz ar vanden, oa d'id sevel da vouez muioc'h eget ne peuz great, hag enebi ouzomp pa c'houlenne Simeon en em zizober euz Joseph, hor breur. Goaz a ze d'id m'ar d'out bet lezirek var da zever !

RUBEN

A ia ! brao e vije bet d'in marvad klask diarben tud hag a velen ken fuloret ha m'edoc'h-c'houi d'an ampoent.

NEPHTALI

En han' Doue, breudeur, grit unan a zaou, pe gomzit siuoloc'h pe pellaït ac'halen abalamour d'hon tad.

SIMEON

Kozeal mad a rez, Naphtali, setu perag e klas-kimp senti ouzid. (*Goude chacha Ruben a gostez hag en eur zousât he vouez*) Silaou ama eun neubeut : Dale'h sonj mad, Ruben, euz ar pezh a dreminas deac'h. N'out ket gwest da nac'h eo te da unan e peuz roet d'eomp an ali da zisken Joseph e puns Dothaïn.

RUBEN

Ha goude ? E peleac'h e fell d'id en em gaout ?

SIMEON

Sklear awoalc'h'eo evit an oll : Hen disken er puns-ze a ioa her c'hondaoni da vervel e berr amzer, eleac'h ni, en eur he verza da varc'hadourien Galaad, n'omp ket bet ken iud ha te en he genver.

ZABULON

Pak an dra-ze, Ruben, hag en em denn ac'haleze m'ar gellez.

RUBEN

Ne sonjen ket oac'h ken dientent-ze, evelato ! M'am euz roet d'eoc'h an ali d'hen disken er puns, n'oa nemet evit miret ouzoc'h da rei dezan taol ar maro, hag en aviz ma vijec'h deuet a neubeudou da zilezel ho kassouni hag ho krisder en he genver. Setu perag, ma ho peuz sonj mad, va ger diveza araok mont da zivoal al loened oa hema : « Ha dreist holl n'ankounac'hait ket eo Joseph breur d'eoc'h. »

SIMEON

Re zivezad e teues da zisplega d'eomp da aviz.

ZABULON

Ia, re zivezad, Ruben, hag anzañ a rankes eo ken sammet da goustians eget hini n'euz fors pehini ac'hanomp, defot beza komzet freassoc'h hag abre-toc'h... Evidon-me, brema, ne c'houlennan mui nemet eun dra : Ra blijñ gant Doue miret d'hor c'has-tiza gant re a gounnar !

RUBEN

Bezit sur, he justis a voezo petra da ober !

SEISVED DIVIZ

JUDA (*o tiredet*)

Breudeur paour, perag chom aze da zebati entre-zoc'h, eleac'h dont en dro d'hon tad ?

RUBEN

Penaoz ema, Juda ?

JUDA

N'her c'havan ket brañ, pell dious eno.

SIMEON

O va Doue ta ! Ken fall-ze eo eat e berr amzer ?

JUDA

Kerkent ha ma zeo bet astennet var he vele, hen deuz bet evel eur fallaen, mez tremen a reas buan. D'ar mare-ma eo morgousket : Bep an amzer e vez gwelet oc'h ober skrijadennoù epad ma lavar evel-hen : Ra varvin... ra varvin da heul Joseph.

ISSAKAR

Neuze ne ket ama eo d'eomp chom, breudeur !

RUBEN

Nan, adrazur... Ankounac'haomp an tam debat a zo bet ganeomp, ha lakomp hiviziken hor poan da frealzi hon tad meurbet karet, e kreiz ar mor a enkreiz hon deuz lakeat da goeza var he speret...

JUDA

Greomp kacroc'h, breudeur ! Goulennomp digant Doue, Mestr ar vuez hag ar maro, ma plijo ganta lezel hon tad pell amzer c'hoas ganeomp, rag na ve ket pounneroc'h darvoud, a sonj d'in, eget rankout divoeret eun tad evel ma ze'o hon hini-ni.

AN OLL (*en eur vont kuit*)

Deomp buan da frealzi hon tad !

TREDE ARVEST

(Trizek vloaz da c'houde)

Bugale Jacob evit ar vech kenta en Ejipt

(An theatr a ziskuez sal an tron e palez Theb)

KENTA DIVIZ

*Epad m'ema Balthazar o tiboultrenna an tron,
Phares a deu da varvaillat*

PHARES

Mignoun Balthazar, va c'hred pe n'her gra ket :
setu me o paouez lakât poeza ar c'hantved sac'had
gwiniz abaoe m'oun savet, ha n'eo ket a veac'h
anteret he hent gant hon Heol benniget. Seiz korn
Beelzebuth, anad eo, ia, e zeuz dienez en tu benag.

BALTHAZAR

Lez ar gernez milliget da ober he reuz, mil
sarpant ruz, keit a ma plijo ganti... Kaer he devezo
poania, ne c'hell ket diskar nemeur a dud, abalamour
d'ar grignoliou gwiniz e peuz an alc'hueziou
anezo.

PHARES

Grignoliou huel, ledan, ha karget beteg an doen !

BALTHAZAR

Red eo hen anzañ, n'euz den ebet gwest da veza
lakeat e kem gant ar ministr a zo brema o vleina
an Ejipt abers hor Pharaon.

PHARES

Evelse e lavar an oll... Ervez ma kounter, hor
ministr a zo eun den evel ma ne vez ket kavet bep
kant vloaz, ha n'eo ket sonez e ve deuet Pharaon
da veza ken dibreder, ken disour si var afferiou he

rouantelez. A veac'h, ma tibouch euz he balez, pa
vez eur gouel braz benag en honor d'hon Doue
Oseris.

BALTHAZAR

Gwir awalc'h an dra-ze !

PHARES

Silaou ta, Balthazar ; daoust ha te a voar euz
a be vro eo hor ministr ? Setu dek miz zo dija
abaoe m'emaoun e tro ar palez, ha biskoas n'am
euz kavet den ebet d'am c'helen var ar poent-ze.

BALTHAZAR

Azez ama neuze, var bazen an tron, ma kountin
d'id... (Phares a azez). Ervez an dud, ar ministr, a
zo brema gant he eisved bloavez, a zo ginidik euz
eur vro hanvet Kanaan — brema avad ne voezan
ket p'eo gwir pe c'haou : an dud a gustum drailla
kement a gelachou — ar pezh a voezam a berz mad
eo kement-ma : Brema e zeuz vardro trizek vloaz
eo bet digasset d'hor bro gant marc'hadourien euz
Galaad, ha gwerzet evel sklavour da eun offiser
brudet, he hano Putiphar... Marteze e peuz klevet
hano euz hennez.

PHARES

Neubeut awalc'h ; ha petra c'hoarvezas da
c'houde ?

BALTHAZAR

E berr amzer e c'hounezas he vestr, rag hema a
fizias enna reiza he dieges en he leac'h... Mez a
greiz tout, e oue tamallet a falloni, ha fatrata !
Setu hen barnet ha taolet er prizoun.

PHARES

O seiz korn Beelzebuth, pebez dichans evelato !
Ha penaoz hen deuz gellet pignat da c'houde e
gorre ar skeul ?

BALTHAZAR

E diabars he brizoun, ouspen ma rene eur vuez fur e pep giz, e tiskuezas c'hoas kaout eur speret digor, sklerijennet var bep tra, ar pezh a estlamme kement hini hen dalemprede. Hogen eun nosvez, Pharaon hen devoue daou ure : Er c'henta e velas seiz bioc'h lard o tiboucha euz a gichen ar ster, ha lounket eb dale gant seiz bioc'h treut-gagn a deuas var ho lerc'h. En eil a velas seiz pen gwiniz leun a c'hreun o sevel var ar memez koloen ha lounket ive e berr amzer gant seiz pen ed goullou.

PHARES

Ureou farsus e gwirionez : ha koulskoude a voezan ervad e tlie Pharaon lakât diez he speret abalamour dezo.

BALTHAZAR

Enkrezet neat edo, mil sarpan rus ! Kenta tra a reas, goude sevel, oue gervel d'he gaout an dud desketa euz he rouantelez, evit klevet ganto petra verke an daou ure ze a roe kement a nec'hamant d'he speret.

PHARES

Neuze e c'halvas ive emichans ar belek braz a zo karget euz aoteriou hon Doue Osiris ? Hennes, var a gounter, a zo desket meurbet :

BALTHAZAR

Ia ! galvet e oue ive, mez evel ar re all e reas kazek. Nikun n'oa gwest da lavaret eur ger : ha Pharaon, liou ar gounnar var he dal a ioa o vont d'ho zerri oll euz ho c'hargou, pa deuas da sonj da unan euz he offiserien euz furnez ha gwiziegez an divroad prizouniet : Roue, emeza, en ho prizoun, ama e kear Theb, e zeuz eun divroad, den a speret lem, hag a zisklerio d'eoc'h marteze petra verk ho taou ure. — Ra vezo kerc'het an den-ze, eme ar Roue, gant eur vouez rust.

PHARES

N'oa ket brao gina adrazar dirak eun evelep gourc'hemen ! Ha penaoz e tremenas an affer, pa deuas ar prizounier d'ar palez, Balthazar ?

BALTHAZAR

An divroad iaouank, a veac'h ma voue, kountet dirazan daou ure ar Roue a gomzas evelhen : Roue galloudus, emeza, an daou ure-ze a verk ar memez tra : ar seiz bioc'h lard evel ar seiz pen ed greunet mad a verk e zeuz arru seiz bloaveziad eost puil, mez ar seiz bioc'h treut evel ar seiz pen ed goullou, a lavar e tlie dont da c'houde seiz bloavez a gernez ..

(Tre i ra he ben evel p'hen deffe klevet trouz).

PHARES

Petra a ra d'id trei da ben varzu aze ? Seiz korn Beelzebuth, emichans ne ket eur fourraden avel a ra d'id krena ?

BALTHAZAR

Kaout a rea d'in beza klevet unan benag o finval dre aze...

(Phares a zao en he zav).

PHARES

Hast buan ta neuze achui da histor, evit ma voezin penaoz eo deuet hennez da veza ar ministr dispar hon deuz brema en Ejipt.

BALTHAZAR

Evel just, Pharaon a c'houlennas raktal diganta petra da ober, hag hen da respount raktal : roue, emeza, gwella tra ho peffe da ober eo dibaba etouez ho sujidi eun den evit gorren gwiniz e grignoliou kear, abars ma teuo ar seiz bloavez eb eost.

PHARES *(en eur frota he zauarn)*

Ah ! entetet eo ganen brema... Pharaon, ne ket

gwir, o velet furnez he zen iaouank, a ginnigas dezan raktal beza he vinistr, gant ar galloud da ober ar pezh a garje en he leac'h !

BALTHAZAR

Ia, Phares ! ha mad en deuz great, rag ar pezh a velomp dirag hon daoulagad hen diskuez d'comp sklear !

... Mil sarfant rus ! pebez ministr hon deuz ! Ar furnez memez ! Breac'h deou Pharaon ! Providans an Ejipt.

PHARES (*o velet Joseph e tostât*)

Peoc'h-ta, Balthazar ! peoc'h-ta : setu hen arru d'hor c'haout.

EIL DIVIZ

JOSEPH

Na gemerit ket evelse an ear da veza stravillet en eur va gwelet. Ne deuan beteg ennoc'h nag evit ho spia, nag evit ho kourdrouz, dre m'oc'h anavezant a bell zo dija evit beza servicherien leal, ha soursius var bep tra.

BALTHAZAR (*en eur stoui he ben*)

N'hon deuz mirit ebet e kementze. Eur mestr evel d'oc'h-c'houi a zo ken eaz da garet ha da zervicha !

JOSEPH

Lezomp ar gaoz-ze, m'ar kirit, evit en em emel deuz eun affar all. Eur vanden dud a zianveas-bro a zo o paouez chom a za dirag dor ar palez, gant kanvaled ha sier goullou, evel pa vent deuet da brena gwiniz.

PHARES

Mestr ! abaoe ar mintin-ma e zeuz bet dija kalz tud var hon tro !

JOSEPH

Ia, her gouzout a ran, Phares, ha mad e peuz great gwerza dezo greun en honestiz : mez piou a voar evit petra e teu an dud-ma ? Digoromp frank hon daoulagad gant aon da veza tromplet ganto.

BALTHAZAR

Bezit disoursi ; ni hon daou en em garg da evessât outo ha c'hoari fin a rankint, m'ar gellont kuzat ouzomp kement tra a livirint pe a raint epad ma vezint dre aze.

JOSEPH

Gwella-ze ; It eta da evessât outo, ha m'ar dint deuet e gwirionez en aviz prena danvez bara, na roit ket dezo ho goulenn araok ober dezo dont d'am c'haout.

BALTHAZAR

Entetet eo, ha great e vo ervez ho kourc'hemen.

PHARES

En eur ho saludi, Mestr !

(*Mont a reont kuit*).

TREDE DIVIZ

JOSEPH

Bremaik, alkodet var prenest ar palez, hag en eur zellet varzu ar Zao-Heol, eo en em gavet va daoulagad da goeza var an divroidi-ze. Raktal va c'haloun zo en em lakeat da zaoulammat em c'hreiz en eun doare souezus, eb na vouien dare abalamour da betra, mez aben eun neubeudik da c'houde, va daoulagad ho deuz va sklerijennet var ar pezh a lavare d'in dija mouez ar goad. Anavezet am euz va breudeur... Ruben, Juda, Simeon, hag ar re all. Ho anavezet am euz eb re a boan, ar breudeur-ze muia karet, en despet d'an trizek vloaz tremenet

abaoue an dervez m'omp bet dispartiet... O ped guech n'eo ket nijet va speret varzu enno, varzu va zad, varzu Kanaan !... Ped gwech n'am euz-me ket skuillet daëlou c'huer, o sonjal en eurusded a dlient tanva e kichenik ho zad, en eur zervicha ar gwir Doue assamblez ganta, epad m'edon ama harluet, etoues divroidi, e mesk sklavourien Satan, dalc'hmad daoulinet ehars an idolou... O va Doue, petra da ober ? Ma ne zilaoufen nemet mouez va c'haloun, me a redfe d'ho briata, me en em rofe dezo da anaout, me a c'houlense diganto eur c'he-lou benag euz va zad Jacob... Mez nan ! n'her grin ket.... Doue, a reiz mad pep tra, a zifen ouzin diskuil piou oun, ken n'ho devezo pact eun nebeut benag ar pezh o deuz great em c'henver, ha dizoloet ive ar zantimanchou a vagont e kenver Benjamin... O va Doue ! ra vezo great eta ho polontez, mes kennerzit ho servicher.... Kennerzit va breudeur muia karet e kreiz ar mor a drubuil a vezo siouas da dreuzi ! (*En eur zellet er meas*) ah ! setu arru duhont va zervicher Balthazar. Daoust ha pe seurt kelou a zigas d'in ?

PEVARE DIVIZ

BALTHAZAR

Mestr, setu ama petra zo nevez gant an dud-ze. Deuet int, emezo, en aviz kaout greun da brena, hag araok m'oamp en em gavet beteg enno, oant dija en hent evit pignat er palez... Prest oc'h d'ho digemeret er zal-ma pe enn eul leac'h all ?

JOSEPH

Ia, Balthazar, ia : er zal-ma e fell d'in rei digemer dezo : rag-ze, grit dezo entreal, ma klevin ganto ho-unan petra glaskont :

(*Pignat a ra var an tron*).

BALTHAZAR (*da Phares a zo er meaz*)

Phares, lavar d'an dud-ze ho deuz kounje da zont dirag an Aotrou Ministr :

(*Raktal a veler Misraïm o tont e toul an or : Ruben, Levi, Juda, Nephtali, Gad ha Dan gant Phares var ho lerc'h a dremen ebïou dezan evit dont var an theatr : Misraïm a lavar dezo a vouez huel*) :

MISRAÏM

Stouit d'an douar dirag ministr galloudus Pharaon, hen deuz pep galloud e rouantelez an Ejipt.

(*Bugale Jacob a zent, ha Misraïm en em denn kuit*).

JOSEPH (*a ra d'he vreudeur sevel en ho zav*)

Savit en ho sav.... Respountit brema e berr gomzou d'ar goulennou am euz da ober d'eoc'h, ha dreist oll, na glaskit ket va zrompla, rag her paea ker a c'helfec'h... Euz a be vro oc'h-c'houi ?

RUBEN

Aotrou, ni zo ginidik a Ganaan, e peleac'h e zeuz naonegez spountus d'ar mare-ma, koulz hag her broïou all tro-var-dro.

JOSEPH

Euz Kanaan ?... Eur gaou bras a livirit aze... kredi a rafen kentoc'h e vec'h spierien, diredet d'an Ejipt evit anaout gwelloc'h doare ar vro, hag en aviz her c'hemeret divesatoc'h.

RUBEN

O nan ! mil guech nan ! Eun evelep sonj, Aotrou, a zo pell diouz hor spered : Ni zo tud didrous, ha n'omp digasset ama nemet en aviz kaout danvez

bara, m'ar d'eo ho madelez gwerza d'eomp eun neubeudik benag.

JOSEPH

Ni velo an dra-ze divesatoc'h... Mez ped edoc'h o tont e kear ? Seblantout a rea d'in beza kountet dek divroad !

RUBEN

N'ho peuz ket faziet, Aotrou : Dek edomp e gwirionez, dek breur savet er memez leac'h ; ma ne velit dirazoc'h nemet c'hues'h eo abalamour ar pevar all a zo chomet da staga hor c'hanvaled... Dont a raint ive d'ho kaout, ma roit kounje dezo.

JOSEPH

Ia, dont a rankint, me a fell d'in, evit ma velin hag ho c'homzou a goezo kompez gand ho re d'eoc'h-c'houi... Ouspen ar pevar breur-ze, daoust ha n'ho peuz ket a gerent all e Kanaan ?

(Joseph a gommans plega he ben).

RUBEN

Eo, avad, Aotrou : Hon tad a zo c'hoas beo, hag evit derc'hel kompagnunez dezan, hen deuz dalc'het hor breudeur iaouanka... Daouzek breur omp bet, evit gwir, mez ar iaouanka nemet unan a zo manket...

JOSEPH *(o sevel he ben)*

Ha pe hano a roec'h da hennet zo manket ?

RUBEN

He hano oa Joseph, hag an hini a zo er gear eo Benjamin.

JOSEPH

Gwelet a rankin ha gwir eo ar guden a gountit aze...

... Setu ho pevar breur o tont, a sonj d'in... Phares, it d'ho diambrouk, ha c'houi oll, en em

zastumit ama en eur c'horn, adren va zervicher Balthazar...

*Prest e veler Misraïm o tont e tal an or ;
ebiou deza e teu Simeon, Issakar, Zabulon,
Aser gant Phares var ho lerc'h.
Misraïm araok en em denna kuit a
lavar a vouez huel :*

MISRAÏM

Stouit d'an douar dirag minist galloudus Pharaon, hen deuz pep galloud e bro an Ejipt.

JOSEPH *(en eur ober d'ar pevar-ma sevel)*

Savit en ho sav... Respountit brema gant ar brassa lealded : ... Euz a be vroe teuit-hu evel-se ?

SIMEON

Euz bro Kanaan e teueomp var eün, Aotrou.

JOSEPH

Ho predeur, a zo en em gavet en ho raok ho deuz great d'in ar memez respount... Kementze hen deuz an ear da veza eur gentel desket dindan evor !... Gwelomp c'hoas : Ho predeur ho deus lavaret ouspen int deuet en aviz kaout greun da brena.

SIMEON

Ne ket eur gaou ho deuz lavaret, rag en aviz kementze ebken omp deuet ama.

JOSEPH

'Vit doare, ho peuz lezet duze e Kanaan, ho tad a zo dija koz.

SIMEON

Ia, Aotrou.

JOSEPH

Gant daou vreur all iaouankoc'h evit derc'hel kompagnunez dezan.

SIMEON

N'eo ket possubl ho deffe va breudeur diskleriet eun evelep tra, m'ho deuz komzet d'eoc'h deuz daou vreur all, n'ho deuz ket ankounac'heat rei da anaout e zeuz manket unan anezo.

JOSEPH

Gwal rok ho kavan en ho respount... Sonjit, m'ar plij, dirag piou e m'oc'h ama. Aberz Pharaon, am euz ar garg da ober ar sklerijen var bep affer... Rag-se, evit gwelet p'eo gwirion ho lavarion pe n'int ket, setu ar pezh a c'hourc'hemennan : Dek edoc'h o tont euz Kanaan, mez ne roñ kounje da zistrei d'ho bro nemet da nao ebken. Unan ac'hanoc'h a zalc'hin ama er prizoun, epad ma zeñ ar re all da gas ho ed d'ar gear ha da gerc'het ar breur iaouank a hanvit Benjamin... Hennez a rankan da velet. Brema avad, piou ac'hanoc'h a vo prizouniet ? Petra benag m'am beffe ar gwir da gemeret n'euz forz pehini en ho touez, e kavan gwelloc'h ho lezel d'en em glevet entrezoc'h... Me zo 'vont d'en em denna a gostez gant va zervicherien, hag aben ma vezin distro, unan ac'hanoc'h a vezo dibabet emichans evit beza va sklavour. (*En eur zavel da vont kuit*). Grit buan ho sonj.

C'HUEC'HVED DIVIZ

ZABULON

Obreudeur ! pebez abaden drist evidomp ! Breac'h Doue a zo o poeza varnomp ; aad awoalc'h eo !

NEPHTALI

Ar pezh zo sur, an taol kenta-ma a zo dija brutal.

JUDA

Arabat eo d'eomp gedal e ve Doue tener en hon

andret, goude ar pezh hon deuz great, brema e zeus trizek vloaz... D'ar vro-ma eo hon deuz lakaat digas hor breur Joseph, hag er vro-ma eo e fell da Zoue hor c'hastiza.

RUBEN

Hen lavaret em boa sklear awoalc'h, deiz an torfet : na zaotrit ket ho koustians en eur rei taol ar maro d'ar bugel... Hor breur eo, hag he c'hoad a c'helfe hon tamal dirag Doue... Gwelit brema ha n'am boa ket skoet just.

SIMEON

Ia, Ruben paour, hen lavaret e poa, sonj mad am euz, ha d'an ampoent edo da zaoulagad o para varnon-me, dre ma vouiez ervad oan kounaret a eneb Joseph muioc'h eget nikun all ebet... Mad, pa zeo gwir ministr Pharaon a c'houlenn unan ac'hanomp evit beza he brizounier, me va-unan eo a jomo : d'in-me ar chadennou houarn epad ma tistroot da Ganaan.

ISSAKAR

Ne da ket da gomz en doare-ze, Simeon : oll hon deuz bet perz en torfet, hag abalamour da ze e ve just tenna plouz berr.

RUBEN

Ezom ebet da denna ar blouzen : me eo ar c'hosa en ho touez, rag-se eo d'in-me chom ama, evit rei da ministr Pharaon eun errez euz honestis ha lealded va breudeur.

SIMEON

Nan, Ruben, nan.

RUBEN

Eo, a lavaran d'id ; na glassez ket enebi ouzin.

SIMEON

Me, eur vech c'hoas, ha me hebken a zo bet pen



abek euz an drouk zo c'hoarvezet : sonj mad e peuz,
Ruben : anez va c'hassoni dreist muzur e pije gel-
let eaz awoalc'h diarben ar re-ma divar hent ar
vuntrevez... O dervez a valeur : Gwelet a ran c'hoas
dirazon puns Dothaïn..... ar gorden... ar zae marel-
let trempet e goad eur gavrez... sel truezus hor
breur.

JUDA

O ia, sonj mad am euz ive euz an oll draou-ze,
evel pa vent nevez c'hoarvezet ; ha glac'har
hon tad ?

SIMEON

Mil geuz am euz d'ar vicher am euz great en ho
kenver, en dervez milleged-ze !

RUBEN

Doue hen deuz anavezet da c'hlac'har, Simeon,
ha pardounet out bet ganta.

SIMEON

Ar fizians-ze a zo em c'haloun ; mez n'euz forz da-
ze, va lezit da gemeret ar chadennou evit beza
sklavour ministr Pharaon. C'houi, kerzit d'ar gear,
ha pa viot digoezet en Hebron, livirit d'hon tad
ober evel ma kavo ar gwella, pe lezer Benjamin da
zont ama d'oc'h heul, pe hen derc'hel ganta en he
gichen, ma kav re boanius hen divoeret...

RUBEN

Awoalc'h, Simeon, awoalc'h : Pa z'eo gwir na
c'hellomp ket en em glevet e vo red d'omp gedal
petra lavaro an Aotrou Ministr, ha plega d'he
zetans..... Setu hen o tistrei gant he zervicherien...
(*Da heul Joseph e teu Balthazar, Phares, Misraïm
hag Eliab*).

SEIZVED DIVIZ

JOSEPH (*en eur bignat var an tron*)

Ac'hanta, ar pezh am boa gourc'hemennet a zo
great emichans ! Pehini ac'hanoc'h a zo eta dibabet
evit chom da brizounier ?

RUBEN

Aotrou, red eo d'eoc'h ober ho choaz etre daou
ac'hanomp : etre ar breur a velit ama ha me.

JOSEPH

Ha perag-ta kementze ?

RUBEN

Evel ma z'oun ar mab ena, e sonje d'in kaout ar
gwir da jom ganeoc'h evel prizounier, mez hema
ne fell ket dezan klevet hano a draou evelse hag a
c'houlenn dougen he-unan ho chadennou.

JOSEPH (*da Zimeon*)

Hag abalamour da betra ne fell ket d'eoc'h silaou
mouez ho preur ena ?

SIMEON

Aotrou, he blas, a sonj din, a dle beza e kichen
hon tad evit her frealzi e kreiz ar ran-galoun hen
devezo, pa vo goulennet diganta divoeret Benjamin
evit eur pennad amzer.

JOSEPH

Ho respount a gavan leun a furnez. Ia, plas eur
mab ena a zo da dosta d'an tad, pa vez ankeniet
hema... Rag-se c'houi eo an hini a zalc'hin... Pe
hano ho peuz ?

SIMEON

Simeon, an eil euz mibien ar patriarch Jacob.

JOSEPH

Silaouit, Simeon, ar pezh e zan da ziskleria. Epad

ma zaio ho preudeur da Ganaan, ha da c'hortoz ma vint distro gant Benjamin, c'houi a vezo va sklavour .. (o c'hervel) Gwardou.

AR GWARDOU (an eil goude egile)

Komzit...

JOSEPH

Chadennit deza he zaouarn hag hen diskennit raktal er prizoun a zo dindan ar palez. (*Senti a reont ; ar breudeur all a zalc'h pleget ho fenn*)... Aze, iec'het, he vuez zoken a respounto evit lealded he vreudeur... (*Simeon a gasser kuit*). (*D'ar re all*) : Ha c'houi, petra livirin-me d'eoc'h ?... Pa z'oc'h deuet, eme-c'houi, en aviz prena greun, n'ho lezin ket da zistrei d'ho pro gant ho sier goulo. Va zervicher Phares, karget euz ar c'hrignoliou, a roio da bep hini ac'hanoc'h ervez oc'h arc'hant.

RUBEN

Mil bennoz d'eoc'h en hano va breudeur hag en hini hon tad.

JOSEPH

O pedi a ran ouспен da zisken em zal da breja, evit kemeret eun dra benag araok mont en hent.

RUBEN

Ra goezo bennoz Doue varnoc'h ha var ho Roue. Bezit sur, ni ne vankimp ket da rei da anaout d'hon tad ar vadelez ho peuz evidomp (*Joseph a rank sec'ha he zaelou*).

JOSEPH

Allo, kerzit da heul Phares, ha grit erves ma lavaro d'eoc'h... (*mont a reont en eur zaludi*). Dreist oll, n'ankounac'hait ket ho pezo da zigas Benjamin d'oc'h heul. Her gwelet a rankan, abars kredi eo gwirion ho lavariou.

RUBEN (*divar dreujou, an or*)

Esperans hon deuz, Aotrou e tistroio ganeomp eb dale.

JOSEPH

Gwella-ze, gwella-ze, rag seulvui e reot buan ho peach, sulgentoc'h e tennoc'h ho preur Simeon euz he brizoun. (*Joseph a zisken divar he dron*).

EISVED DIVIZ

JOSEPH

Ac'hanta, Balthazar, petra sonjit eul an dud-ze ? Kaout a ra deoc'h e vent leal en ho c'homzou ?

BALTHAZAR

Her c'hredi a ran, mestr ; rag re vad am euz evesseat outo, keit ha ma z'int bet dirazoc'h, evit kaout an disterra douetans var ho lealdet.

JOSEPH

Eur blijadur dispar a rit d'in... Me ive a gred stard int tud eun.

BALTHAZAR

Eun dra zo koulskoude ha n'am beuz ket gellet entent freaz awoalc'h, kaer am euz bet digeri va diou skouarn...

JOSEPH

Pehini-ta ?

BALTHAZAR

Dious ho c'hlevet, an divroidi-ze ho deuz great gwechal eun torfet benag hag a voustr var ho c'houstians.

JOSEPH

An amzer da zont hen roio marteze da anaout... Da c'hortoz, setu ar pez a c'houlennan diganeoc'h, gant ma voezoc'h hen derc'hel evidoc'h ebken.

BALTHAZAR

Goulennit n'euz forz petra ; Balthazar, an disterra etouez ho servicherien, n'ho kwerzo biken.

JOSEPH

Bremaik, a greiz ma vo ar re-ze o preja, tostaat euz ho zier, hag eb ober van a netra, fourrit enno kement a arc'hant m'ho devezo roet da Phares evit ho gwiniz... E ginou pep sac'h lakit ive eun tam bara evit an hent... Gwellet a rit n'euz netra re ziez er gourc'hemen-ze.

BALTHAZAR

O nan ! netra diez da ober ! Mont a ran raktal.

JOSEPH

Evit c'hoaz, na glaskit ket gouzout abalamour da betra e roan eun evelep gourc'hemen... Pa vo deuet ar poent, e lakin ar wirionez da bara dirag daoulagad an oll.

BALTHAZAR (*enna he-unan*)

Ama, sur awalc'h, e zeus eun abaden all da gaout c'hoas. (*Mont a ra kuit.*)

NAVED DIVIZ

JOSEPH

O pebez stourmad ! pebez stourmad am euz ran-ket da zouten e goeled va c'haloun !... Nag a boan evit miret d'en em strinka etre ho divrec'h, ha da lavaret dezo va hano !... Nag a boan evit derc'hel ganen va daelou pa ho c'hleven o komz euz va zad !... Va Doue, mil bennoz ! da veza va c'hennerzet e giz m'ho peuz great ! !

Brema e zan var lein va falez ; eno e c'hellin digeri hent d'am daelou, eb risk da veza surprenet gant den ebet ; hag ac'hano am bezo an heur vad da velet va breudeur o vont gant ho hent varzu Kanaan, da c'hortos m'ho gwelin adarre o tistrei dre ar memez hent gant va breur muia karet Benjamin !

PEVARE ARVEST

Bugale Jacob en Ejipt evit an eil guech

KENTA DIVIZ

PHARES (*En eur zont var an theatr gand breudeur Joseph var he lerc'h*)

Anaout a rit dija ar zal-ma, e peleac'h oac'h bet digemeret, sonj mad am euz, pa deujac'h d'an Ejipt evit ar vech kenta... N'euz netra chenchet var he zro...

RUBEN

N'euz netra chenchet var he zro, possubl eo ; koulzkoude n'eo ket eb krena e tostaomp diouti en dervez hirio.

PHARES

Hag abalamour da betra ar spount-ze a gemerit ?

RUBEN

Mil aon hor beuz na ve tamallet d'eomp eul laeronsi... Komprenit ta : En eur en em gaout e Kanaan, omp bet mantret : E ginou hor sac'hajou greun edo an arc'hant hon devoa roet d'eoc'h evit ar gwiniz !! Ah ! bezit sur, an arc'hant-ze n'eo bet laeret gant nikun ac'hanomp hag hen digasset hon deuz gancomp evit hen renta d'eoc'h...

PHARES

Seiz korn Beelzebuth !! ne ententan seurt en ho kaoz.... Petra ? Daoust ha ne ket me an hini zo karget da verza ar greun, ha da renta kount euz an

arc'hant a vez bet touchet ?... Hogen, me n'am euz ket gwelet em bije eun diner neubeutoc'h eget ar pezh a dlien da gaout.

RUBEN

Penaos neuze e ve c'hoarvezet eun evelep tra ? Ar pezh zo sur, an arc'hant-ze n'eo ket deuet en hor zier anezan he-unan.

PHARES

Kredi a c'hellit eo bet fourret eno gant an Doue a zervichit e Kanaan, hag a zo galloudus, a leverer... Ne dal ket eta ar boan tintal eur ger divar ben kementze, na dirag va mestr, na dirag ar re all.

RUBEN

Pa 'z eo gwir e tifennit ouzomp, n'her graimp ket... ha goulskoude...

PHARES

Koulskoude petra ? Peoc'h var an dra-ze, a lavaran-me ; kountit oc'h afferiou all, m'ho peuz da ober...

... Justamant : setu arru hor ministr, dre m'an deuz klevet marvad oac'h en em gavet... En em renkit a bep tu. (*Joseph ha Balthazar a deu er zâl : breudeur Joseph anezo ho-unan a stou d'an douar*).

EIL DIVIZ

JOSEPH (*en eur bignat var he dron*)

Chomit en ho sav... (*goude m'eo azezet*). Gwelomp brema ha c'houi a zo bet tud a c'her... E peleac'h ema ar c'hossa en ho touez ?

RUBEN

Setu me ama, Aotrou.

JOSEPH

Ia ! gwir eo !... oc'h anaout a ran abaoe ho peac'h all... Ac'hanta ? Emichans o peuz sevenet ho promessa... E peleac'h ema ar breur iaouank-ze a dlie dont d'oc'h heul ?

RUBEN

N'ema ket pell diouzoc'h, Aotrou Ministr ! (*o poulza Benjamin*). Sellit, setu ar bugel a rankec'h gwelet dirag ho taoulagad araok kredi hon lavariou.

JOSEPH (*d'ar bugel*)

Va bugel, ra viot benniget gant Doue !.. Netra nemet ha kwelet ebken a garg va c'haloun a levenez... oc'h ear a blij d'in, dreist ar pezh a c'hellan lavaret... Pe oad ho peuz eta, va mignoun ?

BENJAMIN

C'huezek vloaz am euz, Aotrou.

JOSEPH

C'huezek vloaz !.. Ia, ho kredi a ran ! Ho ment hag ho trem hen diskuez sklear awoalc'h... Brema, pa ho peuz gwelet dre aze, ar paleziou alaouret a zo e kear, al laouenidigez a zo o para var dal va sujidi, daoust ha c'houi na assantfec'h ket chom ama atao ganen-me ?

BENJAMIN

O nan, Aotrou... Gwelloc'h e kavan distrei da di va zad.

JOSEPH

Eur gomz vad eo hounnez, va bugel : Eur gomz vad !.. Kendalc'hit da garet evelse ho tad ; netra kaeroc'h var an douar, netra talvoudusoc'h evit

tenna varnoc'h bennoziou an Env... (*da Ruben*).
Ah ! edan o vont da ankounac'hât goulén kelou euz
ho tad. Penaoz ema ? Iac'h eo bepret ?

RUBEN

Iac'h eo, Aotrou, a drugare Doue, evita da veza
dija kroumet gant he oad ha gant an trubuillou en
deuz bet. (*Joseph a guz he zaelou*). Hor pedet hen
deuz da ober d'eoc'h he vella gourc'hennou, ha da
ginnik d'eoc'h ive euz he berz an nebeut profou hon
deuz lezet aze e kichen dor ho palez, kassedadou
rejin ha fiez.

JOSEPH

Kant trugarez dezan, evit an oll profou-ze. — Ha
goude, daoust ha n'hen deuz ket ho karget da ober
eur goulén benag ouz-in ?

RUBEN

Eo zur, Aotrou : Euz he berz, ho pedomp da
verza d'eomp adarre eun nebeut sac'hajou greun,
mar d'eo ho madelez, ha da rei d'eomp kounje da
zistrei raktal d'hor bro : mall a dlle da gaout da as-
velet Simeon ha Benjamin !

JOSEPH

Ho koulennou a vezo selaouet. Va zervicher
Phares a lakaio karga ar sier, epad ma tiskennot
da gemeret eun dra benag, aze, em zal a henor, e
peleac'h e vo rentet d'eoc'h ho preur Simeon.

AN OLL

Mil bennoz d'eoc'h, Aotrou madelezus !

JOSEPH

Goude beza prejet, e c'hellloc'h raktal en em la-
kât en hent. (*Sevel a ra en he zav*). Ne fell ket d'in
ho tale mui... Kerzit da heul Phares ; — bre-
maïk e zin da azeza dious taol, asamblez ganeoc'h.

AN OLL (*en eur zaludi hag en eur vpnt kuit*)
Mil bennoz d'eoc'h, en hano hon tad !

TRERE DIVIZ

JOSEPH (*diskennet divar he dron*)

Balthazar, pa ne zeuz ama nemed'omp hon daou,
e zan da ziskleria dirazoc'h eun dra hag a raio
d'eoc'h beza mantret... meur a vech, sur oun,
ho peuz klasket divinout piou an dud-ze a velit
hirio em falez evit an eil guech !

BALTHAZAR

N'hen nac'hin ket, mestr ! Aliez am euz great ar
goulén-ze ouzin va-unan, mez eb kaout morse res-
pount vad ebet.

JOSEPH

Mont a ran d'ho sklerijenna... An dud-ze, ginidik
a Ganaan, eo va breudeur.

BALTHAZAR

Petra livirit aze ? Ho predeur !.. ho predeur !..
Ah ! brema ec'h ententan eur seurt benag... Mez,
petra ho deuz great ar re-ze da viana, evit beza
bet digemeret ganeoc'h en eun doare ken fall ?

JOSEPH

Ia... Ia, va breudeur int e gwirionez : Int-hi a zo
bet pen abek ma z'oun bet digasset evel sklavour
beteg ar vro-ma e peleac'h am euz gelllet gounid
fizians Pharaon... Na gredit ket koulskoude em
beffe dalc'het kassouni ouz nikun anezo : Nan ! Ho
c'haret a ran er c'hontrol a-greiz va c'haloun, ha
den n'eo gwest da gompren ar boan am euz bet o
viret d'ho briata, en eur lavaret dezo er memez
amzer piou oun evito.

BALTHAZAR

Ho kredi a ran, mestr, abalamour d'ar galoun
aour a anavezan d'eoc'h.

JOSEPH

Mez araok ma tizoloïn dezo ar wirionez, va
c'houstians a c'hourc'hemen d'in lakât da boeza
var ho diou skoaz eur groaz all... Hounnez a vezo
ar bounerra, hag ama, am euz ezom euz ho skoaz-
zel.

BALTHAZAR

Evidon-me, her gouzout a rit a bell-zo, a rañ
evidoc'h n'euz forz petra, gant ma ne vo ket dreist
va nerz :

JOSEPH

Setu ama ar pezh am euz c'hoant a rafec'h :
Kemennit d'hor gwardou ho devezo d'en em zerc'hel
e diabars ar zâl-ma... Goudeze en em dennit kuit,
ha dre guz fourrit e sac'had greun, va breur iacou-
anka an tass arc'hant a zervich d'in dious taol.

BALTHAZAR

En daou c'hourc'hemen-ze n'euz netra re zies,
netra hag a ve dreist va galloud ; rag-se, sevenet
e vint e berr amzer.

JOSEPH

Gwella-ze ! Brema e zan d'en em lakout e mesk
va breudeur... (*En eur vont kuit*). Na gountit netra
euz an traou ma, neketa Balthazar ?

BALTHAZAR

Ententet eo, mestr !

PEVARE DEVIZ

BALTHAZAR

Mil sarpant rus ! setu brema eun affer all, ha

n'oan ket var c'hed anezi, tra... Pebez taol souezus
da ober ! Kemeret tass arc'hant ar Ministr evit hen
fourra e kreiz euz sac'had greun !! Bah ! d'eomp
atao gant hon labour ! Balthazar n'hen deuz nemet
he c'her hag eun dra promettet a dle beza evel eun
dra c'hreat ! (*gervel a ra ar gwardou*) Eh ! gwar-
dou ? gwardou !

AR GWARDOU (*euz a bell*)

Ha goude ! Ha goude ?

BALTHAZAR

Diredit ama, me ho ped, ar c'henta possubl !

MISRAIM (*o tont gant Eliab*)

Assa, paour keas Balthazar, petra zo a nevez-ta
pa res d'eomp direded gant kement a diz ? An tan
a ve krog er palez ?

ELIAB

C'hoant e peffe marteze e rofemp d'id an dorn
evit eur pennad labour benag ?

BALTHAZAR

Nag an cil nag egile, mil sarpant rus ! - Setu
ar pezh a c'hourc'hemen d'eoc'h ar ministr dre va
ginou-me : e diabars ar zal-man ho pezo d'en em
zerc'hel hiviziken, evit sikour diluia kement affer
a c'helfe c'hoarvezout abalamour d'an divroidi a zo
vardro ar palez... Ama eta e rankit chom da ober
gward... Ama, el leac'h-ma !

MISRAIM

Ententet eo a bell-zo, rag n'eo ket red fourra en-
nomp gant an horz... Emichans, e chomi ive ga-
neomp ?

ELIAB

Gant da varvaillou, rimadellet ken brao, e ka-
vimp hon amzer kalz berroc'h !

BALTHAZAR

Ar pezh a c'houlennit diganen a zo dreist va gal-
loud, rag d'in-me ive e zeuz merket labour en eul
leac'h all.

MISRAÏM

Dommaij eo, ventrechien ; ne ket gwir, Eliab ?

ELIAB

Eun dommaij braz zoken.

BALTHAZAR

Ne zervich ket d'eoc'h eta kounta varnon-me, ha
m'ho peuz kementze a ioul da varvaillat, grit ho
marvaillou entrezoc'h ho taou.

MISRAÏM

Ma ne c'helles ket, ne c'helles ket, petra fell d'id ?
Kerz da ober da labour, hag her gra a volentez
vad : Evidomp-ni, Eliab ha me, en em gemer gant
hon hini evel ma tle pep soudard kalounek he ober
bepred.

ELIAB

Kenavo ar c'henta gwelet, Balthazar, hag eb
fachiri, te voar !

BALTHAZAR

Ia, kenavo ar c'henta,

(*Mont a ra huit*),

PEMPED DIVIZ

ELIAB

Misraïm, ma peuz entetet eur seurt benag er
pez lien deuz klasket Balthazar rimadella d'eomp,
aze, eo poent da renka e mesk ar botred fin... Evi-
don-me, sell, hag e rank fen beza kondaonet da
gaout va fen faoutet dre an anter, na ven ket gwest

da lavaret pe seurt affer a ve da ziluia abalamour
d'an divroidi-ze.

MISRAÏM

Na me ken neubeut, ha koulskoude e tle beza da
zivoal, her c'hredi a c'helles, pa z'omp pedet da
ober gward en eul leac'h evel hema.

ELIAB

Da zivoal, a lavaran-me ive ! M'ho deuz da zisfi-
ziout kementze euz tud Kanaan, perag e zeont-hi
d'ho digemeret evel prinset, ha d'ho lezel da furikat
e kement korn euz ar palez ?

MISRAÏM

Re a gabest a vez lezet ganto, evit gwir.

ELIAB

Ma vijen e plas hor Ministr, n'ouzout ket petra
am[bije] great ?

MISRAÏM

Pe seurt ta ?

ELIAB

Diskuez d'an dud-ze an toul n'eo ket bet stanket
gant ar vansounerien, hag ho lakat buan var hent
ho bro... Pep hini etouez he genvrois, me ne ana-
vezan nemet al lezen-ze, ha ma ve heuillet mad, e
ve neubeutoc'h a vizied skotet, mintoue !.. Ah ! ne
lavarant ket e ve red chom eb rei greun d'ar re ezo-
mek, pa zeo gwir hon deuz peadra, mez ober mou-
mounerez da dud ha n'ho anavezet ket !.. Kementze
avad a zisplij d'in...

MISRAÏM

Les anezo ta : goude tout, petra ra ze d'eomp-ni ?
Ma c'hoarvez eun taol filouterez benag, hor mi-
nistr na c'hello tamall nemeta he-unan.

ELIAB (*o sevel he fri*)

O la la ! Misraïm, ne zantes netra gant da fri ?

MISRAIM

Nan zur, Eliab !

ELIAB

O pebez c'houez vad a deu beteg va fronellou !
Eur bariaden a rafen ouz-id e zeuz pourchasset da
dud Kanaan eun tam lib-he-bao a zoare. Allo dont
a res-te enni ?

MISRAIM

O ne dan ket. Koll a rafen ouzid, rag an oll a
voar e peuz eur fri tano, Eliab. (*Phares a veler o
treuzi gant eur plajad kig*)

ELIAB

Hein ! n'am boa ket skoet just ? Setu Phares o
tremen ebou d'eomp gant eur restad euz ar banket.

MISRAIM (*o tostât euz Phares*)

Kig rost, Phares, kig rost ! ne ket fall beza dious
taol ! Mez, petra zo nevez da viana, pa zeo falve-
zet d'hor ministr kemeret eur seurt mizou, hag
abalamour da biou ?

PHARES

Petra zo nevez ? It d'her goulén digant eun all
desketoc'h egedon-me... Ne ententan eur groten er
pez a dremen hirio. Hor mestr a zo evel pa ve he
c'hoad o virvi en he oll voaziet... Na c'hell ket
chom a blas... Pa azez dious taol ec'h en em laka
e kichen an divroad iaouanka evit servicha dezan
ar gwella lodennou... Bremaik eo bet oc'h ober eur
bale er meaz, ha pa zeo distroet, oa trez an daelou
var he zaoulagad... Komprenit, m'ar gellit.

ELIAB

Ha Balthazar, petra sonj euz an traou-ze ?

PHARES

N'oun ket eat d'her c'huriuz ennat, rag gant he
labour ema ive a zrevi.

MISRAIM

An divroidi-ze a zo e risk da jom dre aze epad
pell amzer da stroba kement hini a zo en ti-ma.

PHARES

Nan, Misraim ; na zaleint ket da vont kuit :
Edont dija o pourchas loc'h, var digarez, emezo,
ema ho zad ouz ho gortoz e Kanaan... Mont a ran
buan, gant aon na ve ezom ac'hanon.

(*Mont a ra kuit*)

ELIAB

Koulz oa d'id dusdu, mintoue, beza lezet ganeomp
hon daou ar restad kig-ze... Ni a vije deuet aben
aneza e ber amzer.... Kenavo atao, hag eb fachiri.

C'HUEC'HVED DIVIZ

MISRAIM (*o chom da vantri*)

Biskoas n'am bije sonjet en eun evelep tra ! Hor
ministr galloudus o tiskén ken izel-ze ; oc'h azeza
dious ar memez taol gant divroidi... o servicha
dezo ar pezh a zo a vella en he di !

ELIAB (*dre c'hoaperez*)

Te ne peuz ket bet c'hoas an enor-ze, neketa ?
da breja er palez ? O bez dizoursi, na me ken
neubet ; mez hon tro en em gavo marteze eb dale.

MISRAIM (*atao mantret*)

Evel ma n'euz ket a voged eb tan, evelse ive an
oll draou-ma n'int ket great eb abek... ha koulz-
koude, kaer am euz, ne gavan rezoun vad ebet da
lakat var araok, en despet d'am speret lem, anave-
zet gant an oll.

ELIAB

Mintoue, te zo diskiant awoalc'h o terri da ben

evelse... Sonj-ta er blijadur hon deffe, ma vemp pedet bremaik da vont dious taol !

MISRAIM

Da zrebi restachou tud Kanaan ? Eliab, ne garfes ket evelato.

ELIAB

Hag abalamour da betra ne garfen ket ? Restachou mad a zo mad da gaout, ervez m'am euz klevet abers tud hag er vouie.

MISRAIM

Aviz an eil n'eo ket aviz egile. (*Klevet a rez Balthazar o tiredet*). Unan benag a glevan o tiredet varzu ennomp. Chomomp sioul.

SEISVED DIVIZ

BALTHAZAR (*araok en em ziskuez*)
Gwardou ! gwardou !

MISRAIM

Petra zo-ta, adarre ?

BALTHAZAR

Buan en hent ! buan en hent : Tass arc'hant hor mestr n'ema mui er zal da breja... Laeret eo, ha leac'h zo da gredi eo bet dibradet gant unan euz tud Kanaan.

ELIAB

N'am boa ket lavaret, Misraïm ? Setu petra eo ober re a vovounerez d'an divroidi !

BALTHAZAR

It gant tiz varlerc'h an dud-ze, araok ma vezint er meaz a gear : Furchit ho zier, ha m'ar kavit an

tass arc'hant gant unan pe unan anezo, grit dezo distrei ama, ma vezint barnet.

MISRAIM

Mez lavar d'eomp da genta pe seurt hent ho deuz kemeret.

BALTHAZAR

An hent a velit aze, dirag dor dal ar palez, varzu ar zao-heol ; sùr oun, n'int ket c'hoas erruet gant mogerioù kear, rag-se, ma valeit founus, e pakoc'h anezo eb dale.

MISRAIM

Ventrechien, ne vezer tromplet nemet gant ar re a vez great vad evito. Eliab, kerzomp varlerc'h ar fripouned-ze :

ELIAB

Me assant koll va hano da virviken, ma ne goez ket al laer etre hor meudou... Allo, an troad kleiz da genta. (*Mont a reont d'ar paz en eur gounta assamblez*). Unan, daou, unan, daou...

EISVED DIVIZ

BALTHAZAR

O paour keas tud ! paour keas tud ! dre begement a drubuillou, siouas ! eo red dezo tremen ! Pebez spoutaden evito bremaik pa vo great dezo chom a zav !... Pebez enkreiz en ho speret, pa vo kavet tass arc'hant va mestr, evel eun dra perc'hennet gant ar iaouanka anezo, hag hen divlam kaer... Nan, pa sonjan en traou-ze oll, n'oun ket evit miret da druezi outo, ha petra benag ma ne d'int evidon nemet divroidi, am euz mall braz e vent dizammet, an dud keiz !... (*Gwelet a ra Joseph e tostât*)... — Mestr, kement tra ho poa gourc'hemennet a zo great... Epad m' edo Phares o servicha da zrebi

d'ho preudeur, me am euz gellet kaout an tu da fourra ho tass arc'hant e sachad gwiniz Benjamin, eb beza gwelet gant den ebet, ha brema, p'emaint dija en hent evit distrei d'ho bro, am euz kasset ar gwardou d'ho diarben, evel m'ho poa hen gourc'hemennet.

JOSEPH

Pegeit a zo abaoue ma zeo eat Eliab ha Misraïm d'ho diarben ?

BALTHAZAR

N'euz ket c'hoas gwal bell, evit gwir, mez n'euz forz, ne zaleint ket da zistrei var ho c'hiz, rag ho preudeur n'ho devezo ket bet a amzer da vont beteg mergiou kear, araok beza tizet.

JOSEPH

O breudeur paour ! Nag a boan a lakan-me ober dezo d'ar mare-ma marteze ! Edont o kerzet varzu Kanaan, gant an esperans da velet ho zad a zo var c'hed anezo, al laouenidigez o para var ho zal, ho c'haloun karget a anaoudegez vad en hor c'henver evit ar vad hon deuz great evito, ha brema, setu hi evel flastret dindan eur beac'h spountus a enkreiz, abalamour d'in-me.

BALTHAZAR

N'ho tislavarin ket, ar beac'h a vo pounner da zougen, mez hen diskleria a c'hellan, ne ket an nerz kaloun a vanko d'ho preudeur evit souten ar groaz-ma a vezo an diveza.

JOSEPH

Ah ia : lavaret mad a rit, Balthazar : ho c'hroaz diveza eo. Dija zoken me am euz keuz d'ar pezh am euz gourc'hemennet en ho eneb, ha m'am bije gellet dont var va c'hiz, me am bije espernet dezo ar boan-ma.

BALTHAZAR

Mestr, lezit an affer da vont brema da ben : goude ar c'hlac'har e teuo al levez, ha sulvui ma vo bet moustret ar c'halonou, sul vrassoc'h e vo al laouenidigez pa vo displeget ar wirionez e fas an oll... (*Klevet a vez great trouz*). Petra glevan-me ?... Daoust hag ar re-hont a ve dija arru en dro ? (*O sellet*) Ia, int-hi eo, mestr ! E pen ar vanden e velan Benjamin etre daouarn hor gwardou.

JOSEPH

O na me am euz mall e ve achu !... Va Doue ! va c'hennerzit, me ho ped, e kreiz ar stourm-ma !...

BALTHAZAR

Pignit atao var ho skabel... Goudeze, gant ho furnez, c'houi a voezo penaoz ober evit ar gwella... (*Epad ma pign Joseph var an tron e klever ar gwardou er meas*).

MISRAIM

Tud digoustians ma z'oc'h !

ELIAB

Laeroun divez !... laeroun vil !!

MISRAIM

Mont da ober eun evelep torfed, goude an digemer a zo bet great d'eoc'h !

(*Ho gwelet a rer oc'h entreal*)

NAVED DIVIZ

BALTHAZAR

Ac'hanta ! Kavet eo 'vit doare an tass a ioa diank ?

MISRAIM

Ia, kavet eo : Kerkent ha m'hon deuz digoret

sac'h hema, hon deuz gwelet an tass o lugerni...
(*da vreudeur Joseph*) Allo ! buan d'an douar evit
klevet ar zetans ho koudaono d'ar prizoun.

(*An oll a ia d'an douar, nemet Benjamin a zo
en he zav etre ar gwardou, pleget he ben*).

JOSEPH (*goude ober eur zel var he vreudeur*)

Petra glevan-me divar ho pen ?... Goude an
digemer a zo bet great d'eoc'h... goude beza resevet
greun leiz ho sier... ho peffe bet ar fallagriez da
ober eun taol evel hennes... da laeres eun tass
arc'hant !! Respountit !

JUDA (*o sevel en he zav*)

Aotrou ministr, mantret, stravillet omp lakeat e
gwirionez, gant ar pezh a c'hoarvez ganeomp abaoe
ma dalempredomp an Ejipt, eb na vemp gwest da
lavaret netra evit en em zifen. Red eo d'eomp hen
anza, goualen Doue eo hor sko en eun doare ken
didruez, abalamour d'hor pec'hejou... Pa z'eo gwir
eta e fell da Zoue, ni oll a vezo ho sklavourien keit
ha ma plijo ganeoc'h :

JOSEPH

Nan !... Nan : ne fell ket d'in klevet hano a
draou evelse ; petra rafen-me gant unek sklavour
evel doc'h ? Ne zalc'hin ganen nemet an hini a zo
bet kavet ganta va zass arc'hant : ar re all a
zistroio d'ho bro...

JUDA (*o kroazia he zaouarn*)

Aotrou madeleuz, va lezit da ober eur beden
ziveza, en hano va oll vreudeur, a velit ama daou-
linet ehars ho treid, ha beuzet oll en eur mor
a c'hlac'har.

JOSEPH

Gedit eur pennad : (*da dud he balez*) Balthazar,
Phares, ha c'houi, gwardou, en em dennit, m'ar

plij en eul leac'h all, evit va lezel va-unan gant an
dud-ma.

(*En em denna a reont ha Joseph a jom
he-unan gant he vreudeur*).

DEKVED DIVIZ

JOSEPH (*da Juda*)

Komzit brema, c'houi, ha grit e berr gomzou ar
beden ho peuz goulennet ober...

(*Plega a ra he ben*)

JUDA

Ar patriarch Jacob, glac'haret ato abaoe maro
he vab Joseph, ha kroumet gant an oad, n'hen
deuz assantet lezel Benjamin da zont ama ganeomp,
nemet en despet dezan... Ranket hon deuz toui
dirazan e respountemp euz buez or bugel. Me va
unan am euz roet dezan vager e tistrofe da Ganaan
assamblez ganeomp... Gwelit neuze, Aotrou paour,
ran-galoun an tad-ze, ma c'hoarves d'eomp distrei
eb hor breur Benjamin !... Na c'helfe ket herzel
gant he c'hlachar !... Mervel a rafe var an taol...
(*Mont a ra d'an daoulin*). En han' Doue eta, lezit
Benjamin da vont d'ar gear, ha dalc'hit ac'hanon-
me en he leac'h.

RUBEN

Ho pezet truez, Aotrou, euz daelou hon tad muia
karet.

AN OLL

Truez ! Truez, abalamour d'hon tad !

SIMEON

Kemerit daou ac'hanomp en ho servich, kentoc'h
 eget noazout d'hon tad ha d'hor breur iaouank !...

JOSEPH (*o sevel prount*)

Awoalc'h !... me ho ped !... awoalc'h... Na c'hellan ket kuzat pelloc'h ar wirionez. Savit en ho sav, breudeur muia karet... Ruben, Simeon, Juda... Petra ? va dianaout a rit c'hoas ? me eo Joseph, ho preur, ho peuz gwelet evit ar vech diveza e meziou Dothaïn... Benjamin, te da viana, tosta diouzin eb aon ebet.

BENJAMIN (*o redet varzu Joseph a lavar*) :

O Joseph !...

(*Epad ma pokont an eil d'egile, ar re all a gred a veac'h sevel*).

AR RE ALL (*savet var eur c'hlin*)

Joseph ?... Joseph ?...

JOSEPH

Ia, Joseph he-unan : savit eta buan en ho sav, ha na gemerit aon rag netra ebet (*senti a reont*). An Aotrou Doue eo hen deuz va digasset d'an Ejipt, ha va galvet da veza kenta ministr Pharaon, evit brassa mad va c'henvroiz, eleac'h c'houi, breudeur muia karet, n'oc'h bet nemet oberourien bolontez Doue eb her gouzout... Allo, ankounac'hait ar pezh am euz great evit oc'h aproui ha bevomp egiz breudeur.

RUBEN

O Joseph, na me a zo eurüs hirio, o klevet eur seurt kelou !... Mil bennoz da Zoue a reiz pep tra evit ar gwella !

AN OLL

O ia ! mil bennoz da Zoue :

SIMEON

Me ive a ve eürus, Joseph, ma voeffen ervad e

ven pardouned gan-ez, evel ma sonj d'in oun bet pardounet dija gant Doue !

JOSEPH

O Simeon ! Simeon !... perag eun evelep douetans ?

SIMEON

Siouas !... breur paour !... Ar pezh am euz great en da eneb...

JOSEPH

A zo ankounac'heat... (*En eur zisken d'he vriata*) va lez da rei d'id ar pok a lakaio ar ziel var ar garantez hon unano da viken... (*Her briata a ra*). Distroit brema varzu hon tad, da ziskleria dezan ar pezh ho peuz gwelet. Leverit d'an tad-ze euz va ferz dont ama assamblez ganeoc'h oll.. Evit ho leve e roïn d'eoc'h douarou Jessen, an draonien zrusa zo er vro, el leac'h m'ho pezo pep tra ervez ho c'hoant.. It buan, ha ne zaleit ket da zistrei... Epad an amzer-ze, me en em glevo gant Pharaon ha va sujidi, evit pourchas d'hon tad an digemer a verit kaout abalamour d'he oad ha d'he vertuziou...

(AR RIDOCH A GOEZ)

Taolen a c'hloar evit achui

- (A) E kreiz an theatr, var eun tron, e veler Jacob,
gant eur vreac'h var skoas Joseph hag ar
vreac'h all var skoas Benjamin.
- (B) Adren an tri-ma, savet eun tamik hueloc'h e
veler Phanuel o terc'hel eur gurunen azioc'h
pen Jacob, he vestr.
- (C) A gleiz, e veler en ho zav, gant bodou palmez
en ho dorn, Pares, Balthazar, ar gwardou,
tud en Ejipt.
- (D) A zeou ema breudeur Joseph daoulinet ha
kroaziet ganto ho daouarn : Epad ma vez
sklerijennet an daolen e kanont :

1° Doue madelezus
Selaouit hor peden
Grit ma vimp evurus
Var douarou Jessen !

2° Pebez dudi gwelet
Eur famil reizet mad !!
Ar breudeur unanet
Dindan galloud eun Tad !

